

**Héliès** Guillaume (Bodiliz 1861 – Lezneven 1941). Beleg.

**Bugale Jacob**, bet embannet e 1910. Modernnaet eo bet an doare-skriva.

**Personajou**

Jacob, patriarch santel.

Phanuel, servijer koz e ti Jacob.

Ruben, bugel Jacob.

Simeon, bugel Jacob.

Juda, bugel Jacob.

Nephtali, bugel Jacob.

Isakar, bugel Jacob.

Zabulon, bugel Jacob.

Levi, bugel Jacob.

Gad, bugel Jacob.

Dan, bugel Jacob.

Aser, bugel Jacob.

Jozef, bugel Jacob.

Benjamin, bugel Jacob.

Balthazar, mevel braz e palez Theb.

Phares, mevel braz e palez Theb.

Misraim, gward e palez Joseph e Theb.

Eliab, gward e palez Joseph e Theb.

Eur marhadour ezu bro Gallaad.

En arvest kenta eur paotr yaouank c’hwezeg vloaz a rank ober Joseph... En daou arvest diweza, eun den a dregont vloaz.

# Bugale Jacob

e pevar Arvest hag eun Daolenn.

## Kenta Arvest

Bugale Jacob e mêziou Dothaïn

### Kenta diviz

*A-gleiz Issakar a zo o kignad eur vaz haleg... pelloh e weler Dan hag Aser o korda eur fouet broenn ; a-zehou, Ruben ha Juda, harpet ouz puñs Dothaïn, Nephtali ha Simeon, en o zav, Levi a zo azezet war eur mên. (Ar pemp-mañ a achu o azlein).*

#### Ruben

Selaou 'ta, Nephtali, pa'z eo gwir eo achuet da azlein ganez, kee da ober eur bale war an dachenn, mar plij, evid gweled penaoz ema o doare gand an daou-hont... M'o-deus ezomm skoazell, n'o-deus nemed hen lavared.

#### Nephtali

Ya, mond a ran raktal, Ruben, ha da hortoz va distro, e vezo Doue ganeoh oll... (*Mond a ra kuit*).

#### Dan hag Aser

Ha ganez-te, breur Nephtali.

#### Isakar

Arsa, breudeur, n'eo ket an dra-ze eo... Setu teir sizun tremenet abaoe m'emaom o reded bro gand on loened, deh e Sichem, hirie amañ e Dothaïn, ha n'eus menneg ebed c'hoaz da zistrei da Hebron ?... Kaer zo lavared, er gêr e vez ebatoh o tebri boued tomm, aged o chaka amañ bemdez bara skarnilet hag onion hanter ridet.

#### Simeon

A gav dit, Issakar ? Pep hini e aviz : Evidon-me avad a zo<sup>1</sup> gwelloh ganen tremen eur miz penn-da-benn er mod-mañ eged chom daou zvez deuz tu bali Hebron, goude kaoud eun tamm boued a-zoare... Ar gêr ! ne hellan mui he gouzañv.

#### Ruben

Da entent a ran, Simeon, da entent a ran... Hag eveldout eh anzavan n'eo ket eun dra êz kaoud lagad on Tad o para warnom dalhmad evel p'en deufe c'hoant rei deom da entent ema war zisfiziañs ahanom.

#### Simeon

Ma ne ve c'hoaz nemed e lagad, ne ve nemeur a dra, hag e deod 'ta ! Emichañs n'ho-peus ket ankounac'haet dija ar gourdrouzou hag ar rebechou kaled a ree deom, eun nebeud deveziou a-raog ma kuitaem Hebron ?

#### Juda

---

<sup>1</sup> a zo : eo

O ! Simeon, va lez d'hen lavared dit : seul-vui e teuan da zoñjal en doare ma'z eo bet greet deom ar rebechou-ze a gomzes anezo, seul-vui e komprenan ne oa e kalon on tad eur reked hepken.

### **Simeon**

Pehini 'ta neuze, a zoñj dit ?

### **Juda**

Pehini ? N'eo ket diêz hen divinoud : an hini da ober vad deom ! Ar c'hoant d'on renta tud yaouank, euz ar re furra e-kreiz ar bozamentchou direiz, a weler bremañ siwaz oh en em skigna war douar Kanaan, evel e broiou dizoue.

### **Ruben**

N'am-eus ket a boan o kredi kement-se, rag, on Tad, dre ma'z eo eun den a feiz hag a zoujañs Doue a garfe, evel just, ez afe e vugale dre ar memez hent gantañ. War ar poent-se, ne gavan abeg ebed ennañ, pell diouz eno.... mez ar pezh ne da ket din, eo abalamour e rebechou a vez greet peurvuia goude ma vez bet fourret pennadou ennañ.

*(Aser ha Dan a zo oh êsa o fouet).*

### **Simeon**

Ya, zur, ha pa zoñjan gand piou !... Gand or breur Jozef, a vez dalhamad war e dro, o konta dezañ kement tra a reom pe a lavarom... Jozef ! setu an hini a zo a re war va hent hag a ra din beza dieguz o tostaad ouz ar gêr.

### **Levi**

Ouspenn ugent gwech, ma ve kontet piz, am-eus her hlevet gand e flatrerez.

### **Isakar**

Eun eston eo e gwirionez n'en-efe on Tad kaset anezañ da bourmen diwar e dro, abalamour d'ar vicher-ze.

### **Simeon**

A ya ! Gortoz 'ta... Jozef, eñ, gouzoud a rez koulz ha me, eo kolladenn an ti... Ni, pa 'zao c'hoant ganeom lavared an disterra tra, e vez greet deom kloza or muzellou, brao ha kempenn,, e-leh ar moumoun-ze a vez lezet da rimadella a bep seurt belbiachou, beteg zoken e huñvreou diskiant.

*(Aser gand ar fouet war e skoaz ha Dan a deu da gichenn ar re all).*

### **Ruben**

Evelato eo bet dizonet, n'eus ket c'hoaz pell diwar-benn an huñvreou-ze. Eun devez m'edon a-dreñv an delt, her hlevis o konta d'on Tad unan euz an daou huñvre en-doa rimadellet deom-ni dija ; « Tad, emezañ, seblantoud a ree din edon oh endramm gwiniz gand va oll vreudeur : va herdin-me a jome en o zao, e-leh herdin va breudeur a stoue d'an douar evid adori va re-me. » - « N'az-peus ket achu gand an hueñvreou-ze ? », eme on tad raktal gand eur vouez rust. « E-leh kaozeal a draou evel-se dirag da vreudeur, selaou ar pezh a lavarint dit, bez mad evito, aketuz da ober o lavariou... »

### **Juda**

Ahanta 'ta ! ar pezh a oa emichañs eur huzul euz ar re wella. Gweled a rit ervad n'om ket kasaet gand on tad, evel ma krede lod ahanoh ; *(Nephtali a zistro).*

# Eil diviz

## Nephtali

Breudeur, setu amañ penaoz ema an traou gand ar re-hont... Da genta, Zabulon, hervez ma lavar, a zo dija skuiz gand e vandenn niveruz, hag a houlenñ ma'z afe unan ahanoh da gemered e blas, ar henta ar gwella.

## Levi

*(o sevel diwar e vên)*

Me 'zo o vond raktal pa eo gwir eo en em gavet va zro da evesaad euz an deñved... Nemed unan bennag en ho touez a hoantafe kaoud an enor-ze... Mez ne gredan ket... *(Mond a ra kuit)*.

## Ruben

Hag or breur Gad, n'eus netra a-nevez gantañ ?

## Nephtali

Gad n'en em glemm ket c'hoaz gand re a skuizder ; evelato, e vez anaoudeg en da geñverte, Ruben, m'az-pefe ar vadelez da vond hebdale en e leh, rag lavared a ra eo dit-te bale bremañ da genta.

## Ruben

N'en-deus ket skoet fall, ha bremaig ez in d'hen dizamma ; mez da hortoz e rafes deom kalz plijadur en eur gonta eun nebeud euz an traou az-peus gwelet.

## Nephtali

Konta petra, va Doue benniget ! Kompren a rit n'on ket chomet da zelled ken piz-se en-dro din ; ne garan ket chom da hlapezad evel-se.

## Isakar

Eur ger koulskoude diwar-benn on loened. An deñved, ha kenderhel a reont-i da grignad an dachenn zruz on-eus kavet evito er mintin-mañ ?

## Nephtali

Al lodenn vrasa a zo dija gourvezet e disheol ar gwez palmez ; ar re all a gendalh da beuri, mez evel diwar fae, ar pezh a ziskouez sklêr n'on-deus ket leh da da gaoud truez euz o hov.

## Aser

Nephtali, hag ar gavriker bihan ?

## Dan

Hag on deñvedigou ?

## Nephtali

A zo ken seder ha tra, pa ra deoh kaoud plijadur o klevet euz o helou. An deñved bihan dreist-oll, a oa eun dudi selled outo : a-wechou e lamment en êr, a-wechou all e reent penn an eil d'egile, evel p'o-dije da êsa o nerz... Ar friantiz eo merk ar yehed evito.

## Aser

O ! pegen chañsuz om-ni er bloaz-mañ gand on loened !

### **Ruben**

Ya ! hen lavared mad a hellom ; ha penaoz ne ve ket a lorch en on tad, pa deu an Aotrou Doue da skuilla e vennoziou war e diegez evel m'her gra ! Sur on, ez eus ouspenn triweh miz abaoe ma n'on-deus kollet penn aneval ebed.

### **Juda**

Ar hontrol a zo gwir, a-drugarez Doue, rag pa zistroim ahalenn e vezo ouz on heul ugent gavig nevez, ha war-dro c'hweh dousenn penn-dañvad bihan.

### **Simeon**

Petra 'ra ze ? Hag e soñjit e vo laouennoh bizaj on tad, goude treisa<sup>2</sup>d'ar gêr kement-se a beadra ? Evidon-me, ne gredan ket, tra.

### **Ruben**

Alo, Simeon, setu te adarre en da wasa... A-walh bremañ euz ar gaoz-se, da vihanna beteg gweled dirag on daoulagad an degemer a vo greet deom e bali Hebron.

---

<sup>2</sup> treisa : marteze "treiza".

## Trede diviz

### Zabulon

*(o tond)*

Eur helou ! eur helou ! breudeur !... Arru ez eus eun den d'or haoud e-kreiz or mêziou.

### An oll

Piou 'ta ? Piou 'ta ?

### Zabulon

Evid her gouzoud, n'ho-peus nemed trei ho taoulagad war-zu krehenn Dothain... *(an oll a zell)*. Ahanta ! n'hen anavezit ket, dre ar zae marellet a zo gantañ ?

### Dan

Jozef eo ; eur glaoustre a rafen.

### Nephtali

O ya ! heb douetañs ebed, ar moummoun-ze eo ; an huñvreer divalo en-deus an êr da lavared deom e rankim plega d'e lezenn ha stoui or penn dirazañ, mar plij, beteg an douar.

### Isakar

Mad ! n'ouzon ket penaoz en-deus gellet en em zispartia evel-se euz e dad !

### Nephtali

O kredi a helles ez eus eun dra bennag oh her poulza : piou hen goar ? Marteze eo arru en aviz rimadella deom eun huñvre nevez bennag, ken diskiant hag ar re genta.

### Zabulon

Kredi a rafen kentoh e teu d'or apia evid kaoud tro d'or flatra adarre d'on tad.

### Simeon

*(gand kounnar)*

Lezit anezañ 'ta da zond... Habdale moarvad e welo peseurt vad a deuo dezañ euz e oll huñvreou. Ar gwel hepken anezañ a laka va gwad da vervi, hag hen disklêria a rankan amañ a vouez uhel, setu deuet ar mare da vired ouz hennez da noazoud deom hiviziken.

### Ruben

Mez petra a fell dit lavared, Simeon ? Aon am-eus da veza entetet fall, rag se hast buan dizelei deom ar pezh a zo en da spered.

### Juda

A-walh e ve gourdrour Jozef eur wech evid mad, ha divenn outañ tintal ger ebed mui diwar or penn, dindan boan da veza kalafetet...Ne gav ket dit, Simeon ?

### Simeon

C'hoariellou toud !... Kredit ahanon : n'ez eus nemed eur remed evid divoaza hennez euz ar hiz en-deus kemeret en or heñver : hen lakaad d'ar maro !

### Ruben

D'ar maro, siwaz ?

### **Juda**

D'ar maro ?

### **Isakar**

Te avad, Simeon, a zo yud evelato en e geñver !

### **Simeon**

Ya, d'ar maro, lavared mad a ran, hag hirio memez !...Da betra e talvezfe her gourdrouz pe rei dezañ eur roustadenn ? Traou vên toud ! Eur wech distro da Hebron, kenta tra a rafe a ve on diskuill, ha setu on tad kounnaret en on eneb gwasoh eged morse...Setu perag, ma ve greet diouzin-me, e ve lazet bremaig, ha goloet e gorr a zouar beo... Piou a ve gouest d'on tamall ?

### **Ruben**

Or houstiañs, Simeon, or houstiañs !... A !, en an' Doue, pella euz da spered eun heveleb soñj fallagr !...Jozef a zo breur deom, arabad e ve hen ankounac'haad, hag aon am-eus e teufe e wad, eur wech skuillet, da grial vañjañs en on eneb, evel ma reas gwechall hini Abel a-eneb Kaiñ.

### **Simeon**

Lez anezañ da grial vañjañs ; kaer en-devezo koulskoude ne viro ket ouzom da gousked dizoursi.

### **Ruben**

*(d'ar re all)*

C'hwi oll, va zikourit da ziarbenn Simeon euz eun heveleb torfed. Rei taol ar maro da eur breur ! Biken na dleit asanti da eun dra ken skrijuz... Mar fell deoh en em zizober euz Jozef, e-leh trempa ho pizied en e wad, diskennit anezañ kentoh er puñs seh a zo amañ... N'en em gavo goude ze nemed ar pezh a blijo gand Providañs Doue !

### **Juda**

O ya ! gwelloc'h eo deom ober evel ma lavar or breur Ruben... Euz peseurt aviz out-te, Isakar ?

### **Isakar**

Evidon-me ne glaskin ket hen nah : me a zo a-du gand Ruben.

### **Nephtali**

Ha me ivez !

### **An oll**

Me ivez ! Me ivez !

### **Simeon**

Greom 'ta evel-se, p'emaoh oll a-eneb din... Goude toud, pe mervel trumm, pe mervel gand an dienez a zo atao mervel... Me a houlenn evid va lod hen diskenn e diabarz ar puñs, gand ma vin sikouret gand daou ahanoh... Eüruzamnt am-eus aze eur gordenn greñv.

### **Ruben**

Deuet ar mare evidon d'ho kuitaad, rag Gad a dle beza inouet du-ze oh va gedal... mez, a-raog pellaad ahalenn e fell din e klevfeh va ali diweza : grit kempenn euz Jozef heb morse ankounac'haad eo ho preur evel ma'z eo va hini...

*(Mond a ra kuit).*

### **Simeon**

N'oa ket re abred e vije eet diwar on tro eun heveleb prezeger... Ni a vouezo bremañ petra da ober.

### **Zabulon**

*(o selled)*

Ar moumoun a zo dija tost deom... Eur bisah a zo gantañ war e gein... Dond a ra a-diz, gand eun êr laouennoh eged an heol ?

### **Simeon**

Hebdale, me 'bari, ne vo ket ken laouen-ze e fas... Alo, breudeur, greom dezañ an degemer a verit kaoud ; kemerit eur fas trist oh her gweled ; an neb a ziskouezo chalantiz d'ar moumoun en-devezo afer ganen-me...

*(Gedal a reont Jozef)*



# Pevare diviz

## Jozef

*(goude lakaad ar bisah war an douar)*

Ra vezo Doue ganeoh oll, breudeur muia-karet... Dond a ran a-berz on tad da zegas deoh an tañva euz boued ar gêr... O ! na me am-boas mall da gaoud euz ho kalon.

## Simeon

Lavar 'ta az-poa mall da zond d'or spia, fallagr ma'z out ! Hounnez 'oa da vicher wella... *(Mond a ra da zastum e gordenn).*

## Simeon

*(strafuillet)*

Va breudeur, petra ho-peus hirio ?... Perag ar zellou du a rit ouzin ?... Perag eo ken teñval ho penn ?... Livirit din buan, me ho ped, livirit din...

## Simeon

*(o tostaad outañ)*

Ne zalei ket d'hen gouzoud, rag n'ema ket en or zoñj chom da varhata ganez. *(Lakaad a ra e zorn war e skoaz).*

## Jozef

Simeon, na ra droug ebed din, en an' Doue... Me da gar, Simeon.

## Simeon

*(o tiwiska sae Jozef)*

Ar zae varellet-mañ a rankom da gaoud da genta : re a boan a ree d'on daoulagad he gweled war da ziouskoaz.

## Zabulon

Kalz re a lorch a oa ennout abalamour da hounnez !

## Jozef

*(diwisket)*

Ma n'eus nemed va zae oh ober poan deoh, kemerit anezi... gand ma ne reot droug ebed din... *(o weled ar gordenn o vond en-dro dezañ e kouez d'an daoulin).* Pardon, Simeon... pardon... lez va buhez ganen.

## Simeon

*(en eur starda ar gordenn).*

Piou a gomz dit euz ar maro ? N'emaom ket o vond da blanta ar gontell en da beultrin, ne raim nemed da ziskenn e diabarz ar puñs a welez aze, hag a zervijo dit da lojeiz hiviziken.

## Jozef

O ! va zad ! O ! va zad !

## Zabulon

Moumounn divalo, n'eo ket gand da dad emhout bremañ... Kaerroh a zo ; na helli mui her gweled dirag da zaoulagad.

### **Juda**

Taol evez, Simeon, da lakaad re stard ar gordenn !

### **Simeon**

Ar pezh a zo greet a jomo greet, Juda, ha ne dan ket da gomañs va labour a-nevez evid ober plijadur dit. – Alo - daou zen a volonteze vad, amañ buan,, m'hen diskennin er puñs.

*(Zabulon ha Dan a ro skoazell da Simeon).*

### **Jozef**

*(dre ma tiskenn er puñs)*

Va Doue !.... Pardonit dezo... pardonit dezo...

### **Izakar**

Nag a ardou a zo gantañ o vond d'e lojeiz nevez ! Koulskoude sur, aze e vo êz dezañ da huñvreal evel ma plijo gantañ, da hortoz ma teuo an ankou d'her samma.

### **Nephtali**

Ar pezh ne zaleo ket pell, rag penaoz herzel, hep tamm da zebri, hep tamm êr ebed koulz lavared, heb banne dour da eva, evitañ da veza en eur puñs !

### **Izakar**

Gwir a-walh ar pezh a lavarez, Nephtali.

# Pemped diviz

## Simeon

A ! Setu greet an taol, ha dija va halon a zeblant beza digorroh,pa ‘m-eus gellet en em veñji ! – Selaouit, breudeur ; mar kirit eh en em vodim raktal en-dro d’ar bisah evid tañva ar pez a zo ennañ

## Zabulon

Netra gwelloh ! Pep hini eta d’e blas a-raog kaoud e lod !

*(Simeon, Zabulon ha Naphtali en em laka war eur hlin ; Aser ha Dan a azez war an douar ; Izakar ha Juda a jom en e zao).*

## Simeon

*(o furchal er bisah)*

Sellit ! nag a draou lipouz ! nag a voued druz ! – Da genta eur gignenn greet dre viou ha bleud gwiniz, gand eun trohad mel war he gorre... Zabulon kemer da gontell ha gra lodennou.

## Zabulon

Anad eo e tlee ar moumounn kaoud an tañva, paotred ; anez kement-se moarvad e vije bet tanvaoh ar geusteuenn... Juda, dit-te ar boulh kenta ; a galon vad eo her hinnigan, te ‘oar.

## Juda

*(en eur gemered)*

Bennoz Doue dit, Zabulon.

## Simeon

En eur horn e welan amañ diou feskenn maout, rostet war ar glaou beo ; er horn all, frouez a bep seurt, fiez, rejin du hag orañjou... Astennit ho torn ma roin deoh peb a hini.

*(Kement a reont beb a hini).*

## Zabulon

Ne gavan netra gwelloh da derri ar sehed !... Ahanta, Juda, n’az-peus ket lavaret deom peseurt blaz a gavez gand da damm skwignenn<sup>3</sup> ?

## Juda

Siwaz ! gand va gwella bolontez, n’on ket evid ober dezañ diskenn... Eur beh pounner a zao war va stomok, pa zoñjan pe stuz e vo on tad benniget, pa glevo ar helou a rankim kas beteg dezañ !

## Isakar

Just avad ! me a zo oh en em houlen penaoz e vo deom ar gwella en em gemered evid rei da entent d’on tad e vo kollet e vab Jozef.

## Simeon

---

<sup>3</sup> skwignenn : ?

Lezit war va c'hoant-me eun heveleb kevridi... Arabad deoh kredi eo heb abeg am-eus diframmet e zae digand Jozef.... (*En eur zevel ar zae en êr*). Ar zae-mañ, pa vo trempet ganen e gwad eur gavrig a gomzo anezi he-unan, heb n'on-defe ezomm da zisplega netra.

### **Naphtali**

Koulskoude, Simeon, ne vo ket êz deom chom dizeblant dirag daelou c'hwero on tad !

### **Simeon**

N'hen nahan ket, an taol a zo pouezuz evitañ ; mez an amzer a zo eur remed da bep tra, hag ar glahar-ze a deuzo a-nebeudou, evel ma c'hoarvez gand peb glahar all/ -Goude-ze, peoh d'or houstiañs.

### **Isakar**

(*o selled a-gleiz*)

Nag a varhadourien o tremen dre aze gand o hañvaled ! Nag a varhadourien ! Sellit 'ta, bredeur ! (*An oll a zav*). Ouspenn diou zaousenn a zo anezo, sur on.

### **Zabulon**

Ar re-ze a zo euz bro Galaad, hag a 'z a d'an Ejipt evid gwerza o mahardourez... N'eo ket ar wech kenta din o gweled oh ober o hent dre mêziou Dothain.

### **Juda**

Breudeur, eur zoñj a zo em spered, mez n'ouzon ket ha mad eo din hen dizelei deoh.

### **Simeon**

Alo, lavar deom buan petra eo ar soñj-se.

### **Juda**

Komprenit... En eur weled ar varhadourien-ze am-eus soñjet e ve marteze gwelloh gwerza dezo Jozef eged hen dilezel aze en e buñs, e leh<sup>4</sup> ne raio nemed dizeha gand an dienez !

### **Simeon**

Gwerza dezo Jozef !... Va Doue ! Perag n'her greom ket raktal ?... Nephtali, kerz buan da gaoud mestr ar vandenn a-raog ma vo eet re bell, ha gra dezañ mond amañ ganez. (*Nephtali a ya kuit*). An nebeud mouneiz a resevim a zervijo deom evid meur a dra.

### **Juda**

Simeon, n'eo ket deuz an arhant a dleom selled : kaerra pezh 'zo, or houstiañs ne vezo ket ken behiet, pa 'z eo gwir, en eur werza Jozef, ne ziframmom ket gantañ e vuhez, hag en doare-ze, e helllo beva keit ha ni war an douar.

### **Isakar**

Hag heb na ve falloh e stad eged on hini deom-ni, rag piou nemed Doue a anavez an amzer da zond ? Jozef a hellfe beza eur pabor anezañ e-mesk an divroidi, kredit ahanon.

### **Simeon**

---

<sup>4</sup> e leh : e peleh ; er skrid orin.

Ra vevo eüruz ! Ra vevo eüruz ! a-greiz va halon hen reketan dezañ ; mez, ma vez ebat e zoare e diavêz bro, on hini-ni a vezo ebatoh e bali Hebron, pa ne vo mui etre tad ha ni.

### **Zabulon**

Evel ma lavare Isakar, an traou da zond a zo kuzet ouzom... Mad, n'az-peus nemed soñjal neuze, Simeon, peseurt skotadenn on-efe ma c'hoarzezfe gand ar moumounn distrei da Ganaan eun nebeud bloaveziou ahann.

### **Simeon**

O ! na te 'zo dientent evelato, Zabulon,. Eun heveleb tra ne hell ket c'hoarvezoud. En em laka e leh Jozef, ha goulenn ouzit da-unan penaoz e hellfes dond euz an Ejipt beteg amañ, hep koueza pe etre daouarn laeron, pe etre skilfou anevaled gouez.

### **Zabulon**

Evid gwir n'am-boa ket evesaet euz kement-se ; Bremañ avad e welan n'on-deus ket a leh da gaoud enkrez e giz ebed.

### **Simeon**

Nephtali a dle beza war ar poent da zistrei gand ar marhadour ;da hortoz ma vint amañ, e ve mad deom tenna Jozef euz ar puñs... Dan, Zabulon, roit din an dorn adarre.

*(Tenna a reont Jozef).*

## C'hwehved diviz

**Simeon**

*(da Jozef)*

Setu cheñchet aviz ganeom en da geñver ! E-leh da lezel aze, e diabarz ar puñs-se, on-deus kavet gwelloh da werza da eur marhadour a-ziavez bro.

**Jozef**

Ho klevet am-eus gand ho kaoz... Raktal em-eus pedet Doue da zond d'am hennerza ; setu perah ma havit bremañ ken soublet d'e volontez santel... Grit, va breudeur, hervez ma plijo ganeoh, mez n'eus forz e pe gorn ar bed e vezin harluet, me ne ehanin morse d'ho kared.

*(Plega a ra e benn da ouela).*

**Simeon**

A-raog hirio 'oa dit neuze diskouez da garantez evidom.

**Ar Marhadour**

*(o tostaad)*

Hervez lavar an den-mañ a zo deuet d'am herhed ho-peus eun tamm afer da ober ganen ?

**Simeon**

Ya, sur ! ar sklavour yaouank a zo etre va daouarn n'eo ket falvezet gantañ plega d'ol lezennou, hag ez om en em glevet d'hen gwerza... Va den mad, gwelit pegement e talv deoh.

**Ar Marhadour**

Petra bennag ma'z eo c'hoaz yaouank, ha diwalloud war al labouriou tenn, e kinnigan ugent diner evitañ.

**Simeon**

Ugent diner hepken !

**Ar Marhadour**

Heb eul liard all ouspenn !... Roit buan ho ker, ya pe nann, rag n'am-eus ket amzer da zale.

**Simeon**

Akord ! va den mad ! – Hiviziken eta ar sklavour-mañ a zo ho peadra : grit anezañ ar pez a blijo ganeoh.

**Ar Marhadour**

Setu amañ hoh arhant... *(En eur gonta war dorn Simeon).* Pmep... deg... pemzeg hag ugent. *(En eur gemered Jozef).* Ha bremañ, deus d'am heul –me, paotr yaouank, beteg bro an Ejipt, el leh<sup>5</sup> e vo desket dit plega.

**Jozef**

*(a-raog mond kuit)*

Kenavo ar bed all... Kenavo.

---

<sup>5</sup> el leh e peleh, er skrid orin.

*(E-pad m'ema Simeon o konta e arhant, e benn pleget, ar re all a zo sebezet).*

### **Juda**

O ! Jozef !... O ! paour-kêz breur !... E gomzou diweza o-deus treuzet va halon hed-ha-hed, ha biken ne hellin o ankounac'haad.

### **Isakar**

Ha ma'z-pije taolet evez eveldon-me, Juda, euz ar zell truezuz en-deus greet war-zu ennom, a-raog or huitaad... Biken ken nebeud ne vin gouest d'hen ankounac'haad... *(Mond a ra da zelled)*. Beb an amzer, en-deus evel c'hoant da ober c'hoaz eur zell war-zu amañ, mez ar marhadour a ra raktal eur zachadenn grenn war e vreh evid ober dezañ bale.

### **Nephtali**

*(O vond da zelled)*

Setu i en em gavet o-daou tost d'ar varhadourien all... Ne welez ket Isakar ? Emaer bremañ o sikour Jozef da bignad war gein eur hañval.

### **Juda**

*(O vond ivez)*

Red eo din gweled evid ar wech diweza va breur Jozef, rag n'eo ket lavaret her gwelfen mui... A ! setu eñ a-hont ! Ar gwel hepken anezañ a ra vad d'am halon...

### **Isakar**

Ar pezh a zo sur n'her gweli ket e-pad pell amzer... Setu ar hañvaled o tiskenn d'ar hostez all d'ar grehenn... Ne weler mui nemed e benn... Achu toud...  
*(E-pad ma chomont da vantri, Ruben a deu deuz kostez ar puñs, hag a halv Jozef).*

## Seizved diviz

### Buren

*(o selled ar puñs)*

Jozef, Jozef, *(d'e vreudeur)*. Mez e peleh ema Jozef eta, pa n'her havan ket amañ ?

### Zabulon

Re ziweznad, Ruben, e teuez d'her hlask

### Ruben

E peleh ema or breur ? E peleh ema ? Respontit buan.

### Simeon

Gwerzet eo ganeom evid ugent diner.

### Ruben

Gwerzet ?

### Simeon

Ya, da varhadourien euz bro Ganaad a zo o paouez tremen dre aze evid mond d'an Ejipt.

### Ruben

Petra ? Heb dond d'hen degemer din, ho-peus kredet gwerza ho preur ? O ! tud digalon ma'z oh ! *(Juda a ziroll)*. Goude eun heveleb torfed, em-eus aon e ve milliget ar mêziou-mañ... Ne fell ket din e chomfem amañ pelloh.

### Simeon

Petra 'raim-ni neuze ?

### Buren

En em lakit raktal, pep hini e epnn e vandenn jatal, ha buan en hent evid en em gavin e bali Hebron a-barz warhoaz d'abardaez... Ar gwasaz 'zo siwaz ! eo pa rankim dilezoi d'on tad ar helou her haso marteze beteg ar bez.

O ! va Doue, na lezit ket ho preh da goueza warnom, abalamour da eun torfed evel hemañ.



# Eil arvest

## Buagle Jacob e bali Hebron

### Kenta diviz

#### Jacob

*(e-unan, azezet e-kichenn e delt).*

Beteg pegeid eta e rankin-me chom hep kelou ebed !... Setu ar pardaez o tostaad... ha Jozef ne zistro ket... Derhent deh, pa her hasen war-zu Siehem, evid anaoud doare e vreudeur... e roas din e her e vije distro hirio, kerkent hag ar hreisteiz... Aon a zao ganen dija e ve c'hoarvezet eun darvoud... rag, goude ma ve bet red dezañ mond larkoh... beteg Dothaim, e leh<sup>6</sup> e vez a-wechou va bugale... eñ dija bet amzer a-walh... d'en em gaoud a-benn ar poent-mañ. A ! perag am-eus-me her haset du-ze ? Penaoz n'eo ket deuet em spered hen lezed er gêr gand e vreur bihan Benjamin ? ... Gwelloh e vije bet din mond va-unan... En despet d'am oad, harpet war eur vaz... am-ije greet an hent buanig a-walh... Evel-se am-bije gwelet dreizon va-unan doare va anevaled,... ha roet d'am bugale eun testeni beo euz va harantez en o heñver ; *(Sevel a ra da zelled)*. Kaer am-eus selled war-zu Siehem...den ebed o tiskenn dre gwenodennoù Hebron. *(A vouez uhel)*. va Doue ! Grit eur zell a drugarez ouz eun tad, a zo barr e halloud a enkreuz, *(En eur zistrei e wel Phaniel)*. « Te eo a zo aze, Phaniel ? Ra vezo Doue ganez, va zerijer mad ha leal. »

---

<sup>6</sup> e leh : e peleh, er skrid orin ;

## **Eil diviz**

**Phaniel**

*(en eur saludi)*

Ha ganeoh ivez, mestr bepred karet... Hervez m'ho-poa gourhemennet, ar gwizi a zo lezet da beuri war al letonenn, ha Benjaminig am-eus karget bremañ d'o diwall... Mez, petra ho laka da huanadi ha da hirvoudi, evel ma reeh aze bremaig, p'edon oh en em gavoud ?

**Jacob**

Eur barr enkreiz spontuz.... a zo deuet da vehia va spered ha va halon..., heb na ven gouest, evid c'hoaz, da gompren 'ro abeg da gement-se.

**Phaniel**

Ha diwar-benn petra, mestr ?... Beteg vremañ, her gouzoud a rit, c'hwi n'ho-peus kuzet netra ouz ho servijer Phaniel, ha n'eo ket hirio emichañs ez afeh da glask nah ouzin ar pezh a ra poan spered.

**Jacob**

Jozef... va mab Jozef ne zistro ket.

**Phaniel**

Na gemerit ket kement-se a nehamant, me ho ped, war zigarez n'eo ket en em gavet hennez a-benn ar poent merket... Gouzoud a rit koulz ha me petra eo ar vugale... Pa vezont en hent, e chomont da vantri.... pe da hoariellad gand kement tra a welont hag an amzer a dremen e-biou dezo, na ouezont dare peur... Jozef ne hell ket mui dale pell.

**Jacob**

A ! n'emaout ket ganti, Phaniel paour... n'emaout ket ganti... Me am-eus leh da gredi ez eus c'hoarvezet gantañ eun droug bennag.

**Phaniel**

Peseurt droug ?... Droug ebed ; e êl mad n'en-dije ket hen dilezet emichañs !

**Jacob**

Selaou ma kontin dit... En noz tremenet, me am-eus eun huñvre.. huñvre poaniuz... huñvre ankeniuz mar deu bet biskoaz unan... Seblantoud a ree din edot o tiffamma diganen Jozef, va mab muia karet Jozef ... N'on ket gouest avad da rei da anaoud... na gand piou... nag e peleh... na penaoz. Ar pezh 'zo sur, kaoud a ree din 'oa tennet diganen evid atao, ha kement-se a voustras war va feultrin beteg ober din divuna war an taol, e-kreiz eur mor a zaleou.

**Phaniel**

O ! mestr ! va lezit d'ho kentelia eun nebeud bennag , an huñvreou ne dint netra, traou vên toud, a dremen dre spered an den, ken aliez ha beb noz, ha ne veritont ket e ve taolet evez outo.

**Jacob**

A gav dit, Phaniel ? Selaou ahanon c'hoaz... Doue a hell dre skeudou pe huñvreou, dilezel d'e vugale an traou da zond... Her greet en-deus e-keñver va zad Izaac... koulz hag e-keñver va zad-koz Abraham... Ha perag her huzad ouzit ? Doue en-deus dija komzet ouzin en doareze. Eun devez m'edon en em roet da gousked war hent Haran,, e welis eur skeul, eur penn

anezi harpet en douar, hag ar penn all en Neñv... Hag euz gorre ar skeul-ze, Doue a lavaras din kement-mañ : « Jacob emezañ, an douar m'emaout warnañ gourvezet, me hen roio dit ha d'ar re a ziskenno euz da lignez... » Mad, Phaniel, al leh ma c'hoarvezas ar burzud-se eo Bethel ; hogen d'an ampoent, douarou Bethel ne oant ket c'hoaz din..., mez prest da houde avad, e teujont da veza eul lodenn euz va leve... Bremañ e welez da-unan n'int ket traou vên toud an huñvreou a deu d'an den.

### **Phaniel**

Ba ! eur wech pe ziou n'eo ket atao, ha war zigarez m'edo Doue eno o komz ouzoh e-kreiz ho kousk, n'eo ket lavared e teufe euz e berz an huñvre ho-peus bet en noz tremenet.

### **Jacob**

Salo e vo ar wirionez diouz da gostez ; ne houlennan ket gwelloh... Mez n'ema ket, Phaniel... Sell, eun dra bennag a zo amañ, em hreiz, hag a lavar din ar kontrol beo... (*mond a ra adarre da zelled*). Den ebed atao !... Kaer am-eus dispourbella va daoulagad da zelled... O ! va mab ker Jozef... ma ne zistroez ket, bali Hebron ne vo mui eun dudi evidon, en despet d'he oll gwez kaer, d'he glavezenno, ha d'he bokedou a bep seurt liou... (*o tistrei ouz Phaniel*). Iskuz ahanon, Phaniel paour...ne ran ket mad marteze, oh huanadi evel m'her gran... Goude toud, neketa, n'en em gavo nemed ar pezh a blijo gand an Aotrou Doue.

### **Phaniel**

Nann, a dra zur, hag evel ma vezoh koulz ha me, Doue a zo eun tad ken madelezuz ma reiz atao pep tra evid mad e vugale.

### **Jacob**

... Mond a ran da ober eun tamm diskuiza, aze dindan va zelt (*en eur vond kuit*). Kerkent ha ma'z-pezo eur helou bennag, dered raktal d'hen rei din da anaoud, rag mall braz am-eus da veza sklêrijennet.

### **Phaniel**

Konta warnon a hellit, mestr, ha red eo esperoud n'am-bezo da gas deoh nemer eur helou a levenez.

## Trede diviz

### Phanuel

(*e-unan*)

Feiz on Tad Noe ! Biskoaz da vihanna n'am-eus gwelet va mestr Izrael er stuz m'ema ennañ hirio, dre m'en-deus fourret en e benn eo kollet Jozef, ha lakaet d'ar maro marteze... Gwir eo, ma c'hoarvez koll hennez, en devezo greet eur holl euz ar gwas a toud, rag goude ma ve greet kant gwech tro Kanaan a-bez, ne ve ket kavet eur hrouadur pa da hemañ...

Heb ober gaou ebed euz Ruben ha Juda a zo paotred youank a-feson, euz ar re furra zoken, e hellan lavared koulskoude ar wella e-touez mibien an ti-mañ, speredeg dreist an oll, dous evel eun oanig, laouen evel an heol d'an nevez-amzer, devod ha pur evel eun êl..., en eur ger, poltred beo e vamm Rachel.

Abalamour da ze, Jacob, va mestr en-deus atao her haret dreist ar re all... Va Doue, c'hoant am-befe zoken e tiskoueze re frêz ar garantez en-devoa evitañ, ar pezh a roe tro d'ar vugale all da veza eun tammig jalouz, a zoñj din.- A ! ya, pebez teñzor 'oa Jozef evid an ti-mañ ; setu perag, mar deo kollet e gwirionez, me en em houlenn, me, penaoz e vo gouest Jacob da herzel ouz e rangalon... O ! na me am-eus mall ivez da veza sklêrijennet eun nebeud bennag ! (*klevet e vez trouz fouetou hag orouellerou*). Heñ ? petra a glevan-me ? Daoust hag ar vugale a ve dija o tistrei d'ar gêr gand loened ? Posubl a-walh ! Greom buan eur zell war-zu ar mêziou (*mond a ra da zelled*). Just avad ! ind-i eo... Setu al loened oh en em zastum dija a-vandennou, pep hini dirag e lochenn. Ar maout griz adarre er penn a-raog !...A ! ne zalein ket da veza kelennet, rag setu Ruben, Isakar ha Nephtali oh en em gleved evid dereded amañ a-raog ar re all .... Emaint arru d'am haoud...

(*A-barz m'en em ziskouezont, Phanual a gomz*).

## **Pevare diviz**

### **Phanuel**

C'hwi eo, va mignoned ? Degouezet dija ?

### **Ruben**

*(o tond gand e zaou vreur Isabar ha Naphtali)*

Ya Phanuel, setu-ni adarre en Hebron, a-drugarez Doue, goude teir sizun tremenet ganeom du-ze e-kreiz ar mêziou gouez, dindan bolz an Neñv.

### **Isabar**

Kaer zo lavared, Phanuel, ar gêr eo ar gêr, ha n'eus leh all ebed c'hwekoh da galon an den, war an douar

### **Phanuel**

Da gredi a ran, va mignon, hep poan ebed, setu perag ar vicher a vesaer ho-peus oll kemeret n'he-deus biskoaz greet avi din... Gwelloh 'oa ganen chom da labourad ar winienn...Mez n'eo ket an dra-ze eo. Penaoz eo bet ho yehed du-ze ? N'ez eus chomet nikun ahanoh da hourlerhad<sup>7</sup> en hent ? Brao ho-peus greet ho peaj ?

### **Ruben**

N'on-eus ket bet da glemm re an oll Phanuel.

### **Naphtali**

Deg edom o kuitaad Hebron, bremañ ez eus teir sizun, hag om deg adarre o tostaad ouz or lojeiz.

### **Phanuel**

Petra 'livirit aze ? petra 'livirit ? N'oh nemed deg hepken ? Jozef ho preur n'ema ket o terhel kompagnunez deoh ?

### **Naphtali**

Nann, sur !

### **Phanuel**

O ! pebez maleur ! pebez taol pounner ! Komprenit : Ho tad karantezuz, gand ar mall en-devoa da gaoud euz ho kelou, en-deus kaset Jozef en hent, derhent deh vintin, kerkent ha goulou deiz, en eur hourhemenn dezañ mond beteg Sichem, en aviz ho kaoud eno gand ho chatal.

### **Ruben**

N'edom ket e Sichem, mez e mêziou Dothain ; ahano e teuom bremañ war eun tenn.

### **Phanuel**

---

<sup>7</sup> da hourlerhad : ?

Entent a ran abalamour da betra Jozef n'en-deus ket ho kavet, mez ne welan ket c'hoaz n'eo ket distro euz Sichem a-benn ar poent-mañ. Ho tad ivez a zo enkrezet oll e spered abalamour da gement-se.

### **Ruben**

Hen disklêriet en-deus dirazoh, Phanule ?

### **Phanuel**

Ya, Ruben, n'eus ket c'hoaz pell amzer abaoe n'en-deus ket digoret frank e galon. Ar pezh a ra e vrasa enkrezh eo an huñvre trubuilluz en-deus bet en noz tremenet... E-pad e gousk e seblantas dezañ gweled e vab tennet digantañ, diframmet euz a dre e zaouarn, kaset da bell bro, heb na vije gouest d'hen diwall e feson ebed a-eneb e adersourien.

### **Isakar**

*(da Ruben)*

Pa zoñjes-te war gement-se, Ruben ? Daoust ha Doue en-defe degaset d'on tad eun heveleb huñvre ?

### **Ruben**

Posubl a-walh, Isakar ! posubl a-walh. – *(da Phanuel)*. Phanuel, selaouit ar ger a zo war va muzellou abaoe m'emaom en em gavet dirazoh : P'edom o tond d'ar gêr asamblez, on daoulagad a zo kouezet war eur zae varellet, a oa astennet war bordig an hent, hag on-deus soñjet raktal 'oa sae Jozef or breur Jozef.

### **Phanuel**

Eur zae varellet, dilezet war an hent !! O ! diskouezit anezi buan ; rag mar deo e gwirionez hini ho preur, n'am-bezo ket a boan evid heh anaoud, goude beza he gwelet gantañ ken aliez.

### **Ruben**

Siwaz, Phanuel, n'ema ket gand nikun ahanom on-tri...Simeon en-deus kemeret ar garg d'he lakaad dirag daoulagad on tad. Ne zaleo ket da zond amañ, bezit sur *(o trei da zelled)* Just avad : setu-eñ arru du-hont gand Zabulon ha Juda.

### **Phanuel**

*(o kroazia e zaouarn)*

Pebez trubuill ! Pebez abadenn a ran, kalon e tremeno amañ bremaig, mar deo c'hoarvezet an darvoud ! Mez red eo esperoud koulskoude n'eo ket c'hoarvezet...

# Pemped diviz

**Jacob**

*(a-raog en em ziskouez)*

Seblantoud a ra din beza klevet mouez va bugale muia-karet... *(E-pad ma teu Jacob dre eur hostez e weler Simeon o tiboucha euz an tu all gand Juda ha Zabulon)*. Gweled a ran bremañ ne fazient ket : setu eul lodenn amañ dija, ha setu re all oh en em gaoud dre aze... Arsa, Phanuel, goude ar bromesa az-poa greet bremaig, n'out deuet a-benn d'am gervel, ha te o houzoud ar mall am-boea da gaoud kelou euz va bugale.

**Phanuel**

Iskuzit, mestr ! Edon o vond d'ho kervel pa 'm-eus ho klevet o tostaad.  
*(Ruben a dosta a-nebeudou ouz Jacob)*

**Ruben**

Salud deoh, tad meurbed karet *(pokata a ra d'e zorn)*. En ano va oll vreudeur e reketan a-greiz va halon ma plijo gand Doue ho lezel c'hoaz pell amzer war an douar, leun a nerz hag a yehed. *(An oll a bleg o fenn evid reseo bennoz o zad)*.

**Jacob**

*(En eur zevel e zorn da venniga)*

Ra gouezo bennoziou an Neñv warnout ha war da vreudeur, ken puill ha ma kouez ar gliz war menezioù Jelboe : - Ahanta, peseurt kelou a zegasit din hirio ? Yah oh bet bepred war douarou Sichem ?

**Ruben**

Tad, war letonennou Sichem om bet da genta, evid gwir, mez n'eo ket ahann e teuom bremañ ; euz Dothain eo.

**Jacob**

Euz Dothain ? Emichañs ho preur Jozef en-deus bet an eurvad d'ho kaoud eno ?

**Ruben**

Jozef ?... Va zad !... Daoust hag hen degaset ho-poa war-zu ennom ?

**Jacob**

*(da Phanuel)*

Petra 'lavaren-me dit, Phanuel ? *(D'e vugale)*. O ! va bugale, hastit afo va helenn... petra eo deuet da veza ha preur Jozef ? Ha gwelet ho-peus-c'hwi eun doare bennag dezañ ? Respontit buan.

**Simeon**

*(en eur zond war raog, mez en eur guzad ar zae a-dreñv e gein)*.

Tad, ra blijo gand Doue na ve ket skoet gand ar maro..... Koulskoude, hen disklêria a reom dirazoh, p'edom o tistrei d'ar gêr on-deus kavet eur zae varellet, tachadet a wad, hag hanter roget war he skoaz.

**Jacob**

Va mab, e peleh ema ar zae-ze ? E peleh ?

**Simeon**

Evel aon am-eus oh he dispaka dirag ho taoulagad.

**Jacob**

Diskouez anezi raktal, me hen gourhemenn dit... Diskouez.

**Simeon**

*(o tiskouez)*

Setu hi amañ ; grit eur zell diouti ha gwelit hag hini Jozef eo...

**Jacob**

O ya ! he anaoud a ran... *(pokad a ra dezi)*. A ! heb douetañs ebed.. Jozef a zo maro... biken ne welin mui...

**Phanuel**

*(o kregi e breh Jacob)*

Kouraj, mestr ! Re abred eo deoh c'hoaz koll peb esperañs.

**Jacob**

O ! eun aneval gouez... en-devezo saillet warnañ.

**Juda**

*(o kregi er vreh all)*

Ni ho ped, mirit na veh diskaret gand ho klahar... Evel ma lavar deoh Phanuel, n'eo ket kollet evidoh peb esperañs da weled Jozef o tistrei da Hebron.

**Jacob**

Eo, Juda, eo ; A ! perag on-me bet diskiant a-walh d'her has euz ar gêr ? – Dre va faot eo ! - Bugale... pourchasit din va dillad a gañ<sup>8</sup>... pourchasit zoken va bez... rag ar maro ne zaleo ket pell evidon.

**Simeon**

Alo, tad, na zisperit ket evel-se eur wech c'hoaz... Daoust ha n'ho-peus ket unneg mab all war ho tro, evid soursial ouzoh en ho kozni ?

**Jacob**

Siwaz !... n'am-eus mui va mab Jozef. Phanuel, Juda, va zikourit d'en em dreina beteg va zelt... Eno, astennet war va gwele, e vin gwelloh eged amañ...*(En eur vond kuit)*. O ! va Doue !... C'hwi ho-poa hen roet din... hen tennet ho-peus... diganen Ra vezo greet... ho polontez.

---

<sup>8</sup> a gañ : a gañv.



# C'hwehved diviz

## Isakar

Pebez abadenn ankeniuz eo houmañ, evelato ? Pebez abadenn !... Gouzoud a reom re vad penaoz eo komañset... mez gouzoud ervad e pe zoare eh achuo a zo eun afer all.

## Nephtali

Evidon, me a zo strafuillet mad, ne dan ket d'hen nah ha ma 'm-bije gouezet petra a dlee c'hoarvezoud, em-bije goulennet chom da graouia<sup>9</sup> ar chatal e plas unan euz ar re-hont.

## Simeon

Kedi a hellez, Naphtali, n'emaout ket da-unan er stuz a levez aze... Paour-kêz tad ! beuzet e-kreiz eur mor a hlahar hag abalamour da biou ? (*En em lakaad a ra Nephtali dirag Simeon*). Ahanta, Simeon, petra 'lavar dit bremañ mouez da goustiañs ? Êsoh en em gavez moarvad goude an taol kaer az-peus lakaet ober ?

## Simeon

Euz a beleh e teuez-te da vihanna, Ruben ? An êr az-peus da deuler ar beh warnon-me a-bez, evel pa ne ve den all ebed en afer nemedon.

## Zabulon

Red eo lakaad an traou e-giz m'emaint... Mar deus torfed, hag ez eus, oll on-deus perz ennañ, te koulz hag ar re all.

## Ruben

Me ?

## Zabulon

Ya, te da-unan, Evel maz'z out ar hosa euz ar vandenn, 'oa dit sevel da vouez muioh eged az-peus greet, hag enebi ouzom pa houlenne Simeon en em zizober euz Jozef, or breur. Gwaz a ze dit mar dout bet lezireg war da zever !

## Ruben

A ya ! brao e vije bet din moarvad klask diarbenn tud hag a welen ken fuloret ha m'edoh-c'hwi d'an ampoent.

## Nephtali

En an' Doue, breudeur, grit unan a zaou,, pe gomzit sioulloh pa bellait ahalenn abalamour d'on tad.

## Simeon

Kaozeal mad a rez, Nephtali, setu perag e klaskim senti ouzit. (*Goude sach a Ruben agostez hag en eur zousaad e vouez*). Selaou amañ eun nebeud. Dalh soñj mad, Ruben, euz ar pez a dremenas deh. N'out ket gouest da nah eo te da-unan az-peus roet deom an ali da ziskenn Jozef e puñs Dothain.

## Ruben

Ha goude ? E peleh e fell dit en em gaoud ?

---

<sup>9</sup> graouia : gravad ( ?)

### **Simeon**

Sklêr a-walh eo evid an oll :hen diskenn er puñs-se a oa bet her hondaoni da vervel e berr amzer, e-leh ni, en eur e werza da varhadourien Galaad, n'om ket bet ken yud ha te en e geñver.

### **Zabulon**

Pak an dra-ze, Ruben, hag en em denn ahalese mar gellez.

### **Ruben**

Ne zoñjen ket 'oah ken dientent-se, evelato ! M'am-eus roet deoh an ali d'hen diskenn er puñs, n'oa nemed evid mired surroh da rei dezañ taol ar maro, hag en aviz ma vijeh deuet a-nebeudou da zilezel ho kasoni hag ho krizder en e geñver. Setu perag, ma ho-peus soñj mad, va ger diweza a-raog mond da ziwall al loened 'oa hemañ : « Ha dreist-oll n'ankounac'hait ket eo Jozef breur deoh. »

### **Simeon**

Re ziwevad e teuez da zisplega deom da aviz.

### **Zabulon**

Ya, re ziwevad, Ruben, hag anzae e rankez eo ken sammet da goustiañs hag hini n'eus forz pehini ahanom, defot beza komzet frêsoh hag abretoh...Evidon-me, bremañ, ne houlennan mui nemed eun dra : Ra blijo gand Doue mired d'or hastiza gand re a gounnar !

### **Ruben**

Bezit sur, e justis a ouezo petra da ober.

## Seizved diviz

**Juda**

*(o tereded)*

Breudeur baour, perag chom aze da zebati etrezoh, e-leh dond en-dro d'on tad ?

**Ruben**

Penaoz ema, Juda ?

**Juda**

N'her havan ket brao, pell diouz eno.

**Simeon**

O ! va Doue 'ta ! Ken fall-ze eo eet e berr amzer ?

**Juda**

Kerkent ha ma'z eo bet astennet war e wele, en-deus bet evel eur fallaenn, mez tremen a reas buan. D'ar mare-mañ eo morgousket : beb an amzer e vez gwelet oh ober skrijadennoù e-pad ma lavar evel-henn : Ra varvin... ra varvin da heul Jozef.

**Isakar**

Neuze n'eo ket amañ eo deom chom, breudeur !

**Ruben**

Nann, a dra zur... Ankounac'haom an tamm debat a zo bet ganeom, ha lakaom hiviziken or poan da frealzi on tad meurbed karet, e-kreiz ar mor a enkrez on-deus lakaet da goueza war e spered.

**Juda**

Greom kaerroh, breudeur ! Goulennom digand Doue, mestr ar vuhez hag ar maro, ma plijo gantañ lezel on tad pell amzer c'hoaz ganeom, rag ne vez ket pounnerroh darvoud, a zoñj din, eged diouered eun tad evel ma'z eo on hini-ni.

**An oll**

*(En eur vond kuit)*

Deom buan da frealzi on tad !

# Trede arvest

*(Trizeg vloaz da houde)*

**Bugale Jacob evid ar wech kenta en Ejipt**  
*(An teatr a ziskouez sal an tron e palez Theb)*

## Kenta diviz

*E-pad m'ema Balthazar o tiboultrenn an tro, Phalez a deu da varvaillad.*

### Phalez

Mignon Balthazar, va hred pe n'her gra ket : setu me o paouez lakaad poueza ar hantvet sahad gwiniz abaoe m'on savet, ha n'eo ket a-veh hanteret e hent gand an Heol benniget. Seiz korn Beelzebuth, anad eo, ez eus dienez en tu bennag.

### Balthazar

Lez ar gernez villiget da ober he reuz, mil sarpant ruz, keit ha ma plijo ganti... Kaer he-devezo poania, ne hello ket diskar nemeur a dud, abalamour d'ar grignolou gwiniz az-peus an alhweziou anezo.

### Pharez

Grignolou uhel, ledan, ha karget beteg an doenn !

### Balthazar

Red eo hen anzaou, n'eus den ebed gouest da veza lakaet gand ar ministr a zo bremañ o vleina an Ejipt a-berz or Pharaon.

### Pharez

Evel-se e lavar an oll... Hervez ma konter, or ministr a zo eun den evel ma ne vez ket kavet bep kant vloaz, ha n'eo ket souez e ve deuet Pharaon da veza ken dibreder, ken dizoursi war aferiou e rouantelez. A-veh ma tibouch euz e balez, pa vez eur gouel braz bennag en enor d'on Doue Oziris.

### Balthazar

Gwir a-walh an dra-ze !

### Pharez

Selaou 'ta, Balthazar ; daoust ha te a oar euz a be vro eo or ministr ? Setu deg miz 'zo dija abaoe m'emaon e tro ar palez ha biskoaz n'am-eus kavet den ebed d'am helenn war ar poent-se.

### Balthazar

Azez amañ neuze, war bazenn an tron, ma kontin dit... *(Pharez a azez)*. Hervez an dud, ar ministr, a zo bremañ gand e eizved bloavez, a zo kinidig euz eur vro anvet Kanaan – bremañ avad ne ouezan ket p'eo gwir pe haou : an dud a gustum drailla kement a gelachou – ar pez a ouezan a berz mad eo kement-mañ : Bremañ ez eus war-dro trizeg vloaz eo bet degaset d'or bro gand marhadourien euz Galaad, ha gwerzet evel sklavour d'eun ofiser brudet, e ano Putiphar... Marteze az-peus klevet ano euz hennez.

### Pharez

Nebeud a-walh ; ha petra 'hoarvezas da houde ?

**Balthazar**

E berr amzer e hounezas e vestr, rag hemañ a fizias ennañ reiza e diegez en e leh... Mez a-greiz toud, e oe tamallet a falloni, ha fatrara ! Setu eñ barnet ha taolet er prizon.

**Pharez**

O ! seiz korn Belzebuth !, pebez dichañs evelato ! Ha penaoz en-deus gellet pignad da houde e gorre ar skeul ?

**Balthazar**

E diabarz e brizon, ouspenn ma rene eur vuhez fur e peb giz, e tiskouezas c'hoaz kaoud eur spered digor, sklêrijennet war pep tra,, ar pez a estlamme kement hini hen daremprede. Hogen eun nozvez, Pharaon en-devoe daou huñvre. Er henta e welas seiz buoh lard o tiboucha euz a gichenn ar ster, ha lonket hebdale gand seiz buoh treud-gagn a deuas war o lerh. En eil e welas seiz penn gwiniz leun a hreun o sevel war ar memez koloenn ha lonket ivez e berr amzer gand seiz penn ed goullo.

**Pharez**

Huñvreou farsuz e gwirionez, ha koulskoude e ouezan ervad e tlee Pharaon lakaad diêz e spered abalamour dezo.

**Balthazar**

Enkrezet nêt edo, mil sarpant ruz ! Kenta tra a reas, goude sevel, 'oe gervel d'e gaoud an dud desketa euz e rouantelez, evid kleved ganto petra 'verke an daou huñvre-ze kement a nehamant d'e spered.

**Pharez**

Neuze e halvas ivez emichañs ar beleg braz a zo karget euz aoteriou on Doue Oziris ! Hemañ, war a gonter, a zo desket-meurbed.

**Balthazar**

Ya ! galvet e oe ivez, mez evel ar re all e reas kazeg. Nikun n'oa gouest da lavared eur ger : ha Pharaon, liou ar gounnar war e dal, a oa o vond d'o zerri oll euz o hargou, pa deuas da zoñj da unan euz e ofiserien, euz furnez ha gouiziegez an divroad prizoniet. « Roue, emezañ, en ho prizon, amañ e kêr Theb, ez eus eun divroad, den a spered lemm, hag a zisklêrio deoh marteze petra 'verk ho taou huñvre. » « Ra vezo kerhet an den-ze », eme ar Roue, gand eur vouez rust.

**Pharez**

N'oa ket brao a dra zur dirag eun heveleb gourhemenn ! Ha penaoz e tremenas an afer pa deuas ar prizonier d'ar palez, Balthazar ?

**Balthazar**

An divroad yaouank, a-veh ma oe, kontet dirazom daou huñvre, ar Roue a gomzas evel-henn : « Doue gallouduz, emezañ,, an daou huñvre-ze a verk ar memez tra : Ar seiz buoh lard evel ar seiz penn-ed greunet mad a verk ez eus arru seiz bloaveziad eost puill, mez ar seiz buoh treud evel ar seiz penn-ed goullo, a lavar e tlefe dond da houde seiz bloavez a gernez. »

*(Trei a ra e benn evel m'en-defe klevet trouz).*

### **Phares**

Petra a ra dit trei da benn war-zu aze ? Seiz korn Beezelbuth, emichañs n'eo ket eur fourradenn avel a ra dit krena ?

### **Balthazar**

Kaoud ea ree din beza klevet unan bennag o fiñval dre aze...

*(Phares a zao en e zav)*

### **Phares**

Hastet buan 'ta neuze achui da istor, pa ouezin penaoz zo deuet da veza ar minitr dispar on-deus bremañ en Ejipt ;

### **Balthazar**

Evel just, Pharaon a houlennas, hag eñ da respont raktal : »Roué, emezañ, gwella tra hopefe da ober eo dibaba e-touez ho sujidi eun den evid gorren gwiniz e grignolou kêr, a-barz ma teuio ar seiz bloavezh heb eost. »

### **Phares**

*(en eur frota e zaouarn)*

A ! entetet eo ganen bremañ.. Pharaon, n'eo ket gwir, a welas hennez yaouank hag a ginnigas dezañ raktal beza e vistr, gand ar galloud da ober ar pezh a garje en e leh !

### **Balthazar**

Ya, Phares ! ha mad en-deus greet, rag ar pezh a welom dirag on daoulagad hen diskouez sklêr.

... Mil sarpant ruz ! pebez ministr on-deus ! Ar furnez memez ! Breh dehou Pharaon ! Providañs an Ejipt.

### **Phares**

*(O weled Jozef o tostaad)*

Peoh 'ta, Balthazar, peoh 'ta : « netra hen arru d'her haoud »...

# Eil diviz

## Jozef

Na gemerit ket evel-se an êr da veza strafuillet en eur va gweled. Ne deuan ket beteg ennoh evid ho spia, nag evid ho kourdrouz, dre m'oh anavezet a-bell zo dija evid beza servijerien leal, ha soursiuz ouz pep tra.

## Balthazar

*(En eur stoui e benn)*

N'on-deus mirit ebed en kement-se. Eur mestr eveldoh-c'hwi zo ken êz da gared ha da zervija !

## Jozef

Lezom ar gaoz-se, mar kirit, evid en em emell deuz eun afer all. Eur vandenn dud a-ziavêz bro a zo o paouez chom dirag dor ar palez, gand kañvaled ha seier goullou, evel pa vent deuet da brena gwiniz.

## Phares

Mestr ! Abaoe ar mintin-mañ ez eus bet dija kalz tud war non tro !

## Jozef

Ya, her gouzoud a ran, Phares,ha mad az-pesu greet gwerza dezo greun an onestiz : Med piou a oar evid petra e teu na dud-mañ ? Digorom frank on daoualagad gand aon da veza tromplet ganto.

## Balthazar

Bezit dizoursi ; ni on-daou en em garga da evesaad outo ha c'hoari fin e rankint, mar gellont kuzad ouzom kement tra a lavirint pe a raint e-pad ma vezint dre aze.

## Jozef

Gwell a ze. It dija da evesaad outo, ha mar dint deuet e gwirionez en aviz prena danvez bara, na roit ket dezo o goulenn a-raog ober dezo dond d'am haoud.

## Balthazar

Ententet eo, ha greet e vo hervez ho kourhemenn.

## Phares

En eur ho saludi, Mestr !

*(Mond a reont kuit).*

# Trede diviz

## Jozef

Bremaig, alkodet<sup>10</sup> war prenestr ar palez, hag en eur zelled war-zu ar Zao-heol, eo en em gavet va doualagad da goueza war an divroidi-ze. Raktal va halon 'zo en em lakaet da zaoulammad em hreiz en eun doare souezuz, heb na ouien dare abalamour da betra, mez a-benn eun nebeudig da houde, va daoulagad o-deus va sklêrijennet war ar pezh a lavare din dija mouez ar gwad. Anavezet em-eus va breudeur... Ruben, Juda, Simeon, hag ar re all. O anavezet em-eus heb re a boan, ar vreudeur-ze muia-karet, en despet d'an trizeg vloaz tremenet abaoe an devez m'om bet dispartiet... O ! ped gwech n'eo ket nijet va spered war-zu enno, war-zu va zad, war-zu Kanaan ! .. Pedi gwech n'am-eus ket skuillet daerou c'hwero, o soñjal en eürusted a dleent tañva e-kichennig o zad, en eur zervija ar gwir Doue asamblez gantañ, e-pad m'edon amañ harluet, e-touez divroidi, e-mesk sklavourien Satañ, dalhmad daoulinet e-harz an idolou<sup>11</sup>... O ! va Doue, petra da ober ? Ma ne zelaoufen nemed mouez va halon, me a redfe d'o briata, me en em rofe dezo da anaoud, me a houlennfe diganto eur helou deuz va zad Jacob... Mez nann ! n'her grin ket... Doue a reiz mad pep tra, a zivenn ouzin diskuill piou on, ken n 'o-devezet paeet eun nebeud bennag ar pezh o-deus greet em heñver, ha dizoloet ivez ar santimantchou a vagont e-keñver Benjamin... O ! va Doue ! ra vezo greet eta ho polontez, mez kennerzit ho servijer.. Kennerzit va breudeur vuiarkaret e-kreiz ar mor a drubuill a vezo siwaz da dreuzi ! (*En eur zelled er-mêz*). Mez setu arru du-hont va zervijer Balthazar. Daoust ha peseurt kelou a zegas din ?

---

<sup>10</sup> alkodet : ger bet ijinet diouz ar galleg.

<sup>11</sup> idolou : **notenn gand Hirwaz** :eur beleg kristen e oa Helies. Kredi a ree e oa eun "idol" doue ar relijionou all.



# Pevare diviz

## Balthazar

Mestr, setu amañ petra 'zo nevez gand an dud-ze. Deuet int, emezo, en aviz da gaoud greun da brena, hag a-raog m'oam en em gavet beteg enno, oant dija en hent evid pignad e palez... Prest oh d'o degemeret er zal-mañ pe en eul leh all ?

## Jozef

Ya, Balthazar, ya : er zal-mañ e fell din rei degemer dezo : rag se, grit dezo antreal, ma klevin ganto o-unan petra 'glaskont.

*(Pignad a ra war an tron).*

## Balthazar

*(da Phares a oa er-mêz)*

Phares, lavar d'an dud-se o-deus ....<sup>12</sup> da zond dirag an Aotrou Ministr.

*(Raktal e weler Misraim o tond e toull an nor : Ruben, Levi, Juda, Nephtal, Gad ha Dan gnd Phares war o lerh a dremen e-biou dezañ evid dond war an teatr. Misraim a lavar dezo a vouez uhel) :*

## Misraim

Stouit d'an douar dirag ministr gallouduz Pharaon en-deus peb galloud e rouantelez an Ejipt.

*(Bugale Jacob a zent, ha Misraim en em denn kuit).*

## Jozef

*(a ra d'e vreudeur sevel en o zav).*

Savit en ho sav.... Respontit bremañ e berr gomzou d'ar goulennou am-eus da ober deoh, ha dreist-oll, na glaskit ket va zrompla, rag her paea ker a hellfeh... Euz a be vro oh-c'hwi ?

## Ruben

Aotrou, ni 'zo genidig a Ganaan, e leh ez eus naonegez spontuz d'ar mare-mañ, koulz hag er broiou all tro-war-dro.

## Jozef

Euz Kanaan ?... Eur gaou braz a livirit aze... Kredi a rafen kentoh e veh spieren, deredet d'an Ejipt evid anaoud gwelloc'h doare ar vro, hag en aviz he hemered diwezatoh.

## Ruben

O ! nann. mil gwech nann ! Eun hevelep soñj, Aotrou, a zo pell diouz or spered : Ni a zo tud didrouz, ha n'om degaset amañ nemed en aviz kaoud danvez ...<sup>13</sup> mar deo ho madelez gwerza deom eun nebeud bennag.

## Jozef

...<sup>14</sup> welo an dra-ze diwezatoh... Mez ped edoh o tond e kêr ? Seblantoud a ree din beza kontet ....<sup>15</sup> divroad.

---

<sup>12</sup> o-deus .... : illisible.

<sup>13</sup> ... : illisible.

<sup>14</sup> ... illisible.

<sup>15</sup> .... illisible.

### **Ruben**

N'ho-peus ket faziet, Aotrou. Deg edom e gwirionez, deg breur savet er memez leh ; ma ne welit dirazoh nemed c'hweh eo abalamour ar pevar all, chomet da staga or hañvaled... Dond a raint ivez d'ho kaoud, ma roit koñje dezo.

### **Jozef**

Ya, dond a rankint, me a fell din, evid ma welin hag o homzou a gouezo kompez gand ho re deoh-c'hwi... Ouspenn ar pevar breur-ze, daoust ha n'ho-peus ket a gerent all e Kanaan ?  
(*Jozef a gomañs plega e benn*).

### **Ruben**

Eo, avad, Aotrou : On tad a zo c'hoaz beo, hag evid derhel kompagnunz dezañ en-deus dalhet or breudeur yaouanka.... Daouzeg breur om bet, evid gwir, mez ar yaouanka nemed unan a zo manket...

### **Jozef**

(*o sevel e benn*)

Ha pe ano a roeh da hennez a zo manket ?

### **Ruben**

E ano 'oa Jozef, hag an hini a zo gêr eo Benjamin.

### **Jozef**

Gweled a rankin ha gwir eo ar gudenn a gontit aze...

... Setu ho pevar breur o tond, a zoñj din...

Phares, it d'o diambroug, ha c'hwi oll, en em zastumit amañ en eur horn, a-dreñv va zervijer Blathazar.

(*Prest e weler Misraim o tond e-tal an nor ; e-biou dezañ e teu Simeon, Isakar, Zabulon, Aser gand Phares war o lerh... Misraim, a-raog en em denna kuit a lavar a vouez uhel*) :

### **Misraim**

Stouit d'an douar dirag ministr gallouduz Pharaon, en-deus peb galloud e bro an Ejipt.

### **Jozef**

(*En eur ober d'ar pevar-mañ sevel*).

Savit en ho sav... Respontit bremañ gand ar brasa lealded : ... a be vro e teuit-hu evel-se ?

### **Simeon**

Euz bro Kanaan e teuom war-eeun,Aotrou.

### **Jozef**

Ho preuder a zo en em gavet en ho raog o-deus greet din ar memez respont... Kement-se en-deus an êr da veza eur gentel desket dindan eñvor !... Gwelom c'hoaz : ho preudeur o-deus lavaret ouspenn int deuet en aviz da gaoud greun da brena.

### **Simeon**

N'eo ket eur gaou o-deus lavaret, rag en aviz kement-se hepken om deuet amañ.

### **Jozef**

'Vid doare, ho-peus lezet du-ze e Kanaan ho tad a zo dija koz.

### **Simeon**

Ya, Aotrou.

### **Jozef**

Gand daou vreur all yaouankoh evid derhel kompagunez dezañ.

### **Simeon**

N'eo ket posubl o-defe va breudeur disklêriet eun hevelep tra. M'o-deus komzet deoh deuz daou vreur all, n'o-deus ket ankounac'haet rei da anaoud ez eus manket unan anezo.

### **Jozef**

Gwall rok ho kavan en ho respont. Soñjit, mar plij, dirag piou emaoñ amañ. A-berz Pharaon, am-eus ar garg da ober ar sklêrijenn war beb afer... Rag se, evid gweled pe eo gwirion ho lavariou pe n'int ket,, setu ar pezh a hourhemennan : Deg edoh o tond euz Kanaan, mez ne roin koñje da zistrei d'o bro nemed da nao hepken. Unan ahanoh a zalhin amañ er prizon, epad ma'z ey ar re all o ed d'ar gêr ha da gerhed ar breur yaouank a anvit Benjamin...Hennez a rankan da weled. Bremañ avad, piou ahanoh a vo prizoniet ? Petra bennag ma 'm-befe ar gwir da gemered n'eus forz pehini en ho touez, e kavan gwelloh ho lezel d'en em gleved etrezoh.... Me 'zo 'vond d'en em denna a-gostez gand va zervijerien, hag a-benn ma vezin distro, unan ahanoh a vezo dibabet emichañs evid beza va sklavour. (*En eur zevel da vond kuit*). Grit buan ho soñj.

# C'hwehved diviz

## Zabulon

O ! breudeur ! Pebez abadenn drist evidom ! Breh Doue a zo o poueza warnom ; anad a-walh eo !

## Nephtali

Ar pezh 'zo sur, an taol kenta-mañ a zo dija brutal.

## Juda

Arabad eo deom gedal e ve Doue tener en on andred, goude ar pezh on-deus greet bremañ ez eus trizeg vloaz.... D'ar vro-mañ eo on-deus lakaet degas or breur Jozef, hag er vro-mañ eo e fell da Zoue or hastiza.

## Ruben

Hen lavaret em-boa sklêr a-walh, deiz an torfet : na zaotrit ket ho koustiañs en eur rei taol ar maro d'ar bugel... Or breur eo, hag e wad a hellfe on tamall dirag Doue... Gwelit bremañ ha n'am-boa ket skoet just.

## Simeon

Ya, Ruben paour, hen lavaret az-poa, soñj mad am-eus, ha d'an ampoent edo da zaoulagad o para warnon-me, dre ma ouies ervad 'oan kounnaret a-eneb Jozef muih eged nikun all ebed.... Mad, pazeogwir ministr Pharaon a houlenn unan ahanom evid beza e brizonier, me va-unan eo a jomo : din-me ar chadennoù houarn e-pad ma tistroot da Ganaan.

## Isakar

Ne da ket da gomz en doare-ze, Simeon : oll on-deus bet perz en torfet, hag abalamour da ze e ve just tenna plouz berr.

## Ruben

Ezomm ebed da denna ar blouzenn : me eo ar hosa en ho touez,, rag se eo din-me chom amañ, evid rei da ministr Pharaon eun evez euz onestiz ha lealded va breudeur...

## Simeon

Nann, Ruben, nann.

## Ruben

Eo, a lavaran dit ; na glakez ket enebi ouzin.

## Simeon

Me, eur wech c'hoaz, ha me hepken a zo bet pennabeg euz an droug 'zo c'hoarvezet : soñj mad az-peus, Ruben : anez va hasoni dreist muzur, az-pije gelllet êz a-walh diarbenn ar re-mañ diwar hent ar vuntrez... O ! devez a walleur : gweled a ran c'hoaz dirazon puñs Dothain... ar gordenn... ar zae varellet trempet e gwad eur havrez...sell truezuz or breur.

## Juda

O ya ! soñj mad am-eus ivez euz an oll draou-ze, evel pa vent nevez c'hoarvezet ; ha glahar on tad !

## Simeon

Mil geuz am-eus d'ar vicher am-eus greet en ho keñver, en devez milliget-se !

**Ruben**

Doue en-deus anavezet da hlahar, Simeon, ha pardonet out bet gantañ.

**Simeon**

Ar fiziañs-se a zo em halon ; mez n'eus forz da ze, va lezit da gemered ar chadennou evid beza sklavour ministr Pharaon. C'hwi, kerzit d'ar gêr, ha pa viot degouezet en Hebron, livirit d'on tad ober evel ma kavo ar gwella, pe lezel Benjamin da zond amañ d'hoh heul, pe hen derhel gantañ en e gichenn, ma kav re boniuz hen divoared.

**Ruben**

A-awalh,Simeon, a-walh : Pazeogwir ne hellom ket en em gleved e vo red deom gedal petra 'lavaro an Aotrou Ministr, ha plega d'e zetañs... Setu eñ o tistrei gand e zervijerien...  
*(Da heul Jozef e teu Balthazar, Phares, Misraim hag Eliab).*

## Seizved diviz

**Jozef**

*(en eur bignad war an tron)*

Ahanta, ar pezh am-boea gourhemennet a zo greet, emichañs ! Pehini ahanoh a zo eta dibabet evid chom da brizonier ?

**Ruben**

Aotrou, red eo deoh ober ho choaz etre daou ahanom : etre ar breur a welit amañ, ha me.

**Jozef**

Ha perag 'ta kement-se ?

**Ruben**

Evel ma'z on ar mab hena, e soñje din kaoud ar gwir da jom ganeoh evel prizonier, mez hemañ ne fell ket dezañ klevet ano a draou evel-se, hag a houlenn dougen e-unan ho chadennoù.

**Jozef**

*(Da Zimeon)*

Hag abalamour da betra ne fell ket deoh selaou mouez ho preur hena ?

**Simeon**

Aotrou, e blas, a zoñj din, a dle beza e-kichenn on tad evid her frealzi e-krei ar ranngalon hen devezo, pa vo goulennet digantañ divroed Benjamin evid eur pennad amzer.

**Jozef**

Ho respont a gavan leun a furnez. Ya, plas eur mab hena a zo da dosta an tad pa vez ankeniet hemañ... Rag-se, c'hwi eo an hini a zalhin... Pe ano ho-peus ?

**Simeon**

Simeon, an eil euz mibien ar patriach Jacob.

**Jozef**

Selaouit, Simeon, ar pezh ez an da zisklêria. E-pad ma'z aio ho preudeur da Ganaan, ha da hortoz ma vint distro gand Benjamin, c'hwi a vezo va sklavour... *(O herveel gwardou)*.

**Ar gwardou**

*(an eil goude egile)*

Komzit !

**Jozef**

Chadennit dezañ e zaouarn hag hen diskennit raktal er prizon a zo dindan ar palez. *(Senti a reont ; ar vreudeur all a zalh pleget o fenn)*. .. Aze, yehed ; e vuhez zoken a responto evid lealded e vreudeur.... *(Simeon a gaser kuit)*. *(D'ar re all)* : Ha c'hwi, petra 'lavarin-me deoh ?... Pa'z oh deuet, emedoh, en aviz prena greun, n'ho lezin ket da zsitrei d'ho pro gand seier goulo. Va zervijer Phares, karget euz ar hrignolou, a roio da bep hini ahanoh hervez e arhant.

**Ruben**

Mil bennoz deoh en ano va breudeur hag en hini on tad.

### **Jozef**

Ho pedi a ran ouspenn da ziskenn em zal da breja,, evid kemered eun dra bennag a-raog mond en hent.

### **Ruden**

Ra gouezo bennoz Doue warnoh ha war ho Roue. Bezit sur, ni ne vankim ket da rei da anaoud d'on tad ar vadelez ho-peus evdiom. (*Jozef a rank seha e zaelou*).

### **Jozef**

Alo, kerzit da heul Phares ha grit hervez ma lavaro deoh... (*Mond a reont en eur zaludi*) Dreist-oll, n'ankounac'hait ket ho-pezo da zegas Benjamin d'hoh heul. Her gweled a rankan, a-barz kredi eo gwirion ho lavariou.

### **Ruben**

(*diwar treuziou an nor*)

Esperañs on-deus, Aotrou, e tistroio ganeom hebdale.

### **Jozef**

Gwell a ze, gwell a ze, rag seul-vui e reot buan ho peaj, seul gentoh e tennoh ho preur Simeon euz e brizon. (*Jozef a ziskenn diwar e dron*).

## Eizved diviz

**Jozef**

Ahanta, Balthazar petra 'zoñjit euz an dud-se ? Kaoud a ra deoh e vent leal en o homzou ?

**Balthazar**

Her hredi a ran, mestr ; rag re vad am-eus evesaet outo, keit ha ma'z int bet dirazoh, evid kaoud an disterra douetañs war o lealded.

**Jozef**

Eur blijadur dispar a rit din... Me ivez a gred stard int tud eeun.

**Balthazar**

Eun dra 'zo koulskoude ha n'am-beus ket gellet entent frêz a-walh, kaer am-beus bet digeri va diou skouarn...

**Jozef**

Pehini 'ta ?

**Balthazar**

Diouz o hleved, an divroidi-ze o-deus greet gwechall eun torfet bennag hag a voustr war o houstiañs.

**Jozef**

An amzer da zond hen roin marteze da anaoud... Da hortoz setu ar pezh a houlennan diganeoh, gand ma ouezoh hen derhel evidoh hepken.

**Balthazar**

Goulennit n'eus forz petra ; Balthazar, an disterra e-touez ho servijerien, n'ho kwerzo biken.

**Jozef**

Bremaig, a-greiz ma vo ar re-ze o preja, tostait euz o zeier, hag oh ober van a netra, fourrit enno kemend a arhant m'o-devezo roet da Phares evid o gwiniz... E genou pep sah lakit ivez eun tamm bara evid an hent... Gweled a rit n'eus netra re ziêz er gourhemenn-ze.

**Balthazar**

O ! nann. Netra diêz d ober ! Mond a ran raktal.

**Jozef**

Evid c'hoaz, na glaskit ket gouzoud abalamour da betra e roan eun heveleb gourhemenn... Pa vo deuet ar poent, e lakin ar wirionez da bara dirag daoulagad an oll.

**Balthazar**

*(ennañ e-unan)*

Amañ, sur a-walh, ez eus eun abadenn all da gaoud c'hoaz. *(Mond a ra kuit)*



# Naved diviz

## Jozef

O ! pebez stourmad am-eus ranket da zouten e goueled va halon !... Nag a boan evid mired d'en em strinka etre o divreh, ha da lavared dezo va ano !... Nag a boan evid derhel ganen va daelou pa o hleven o komz euz va zad !... Va Doue, mil bennoz ! da veza va hennerzet e-giz m'ho-peus greet ! !

Bremañ ez an war lein va falez ; eno e hellin digeri hent d'am daelou, hep risk da veza surprenet gand den ebed ; hag ahano em-bezo an eurvad da weled va breudeur o vond gand o hent war-zu Kanaan, da hortoz m'o gwelin adarre o tistrei dre ar memez hent gand va breur muia-karet Benjamin !

# **Pevare arvest**

*Bugale Jacob en Ejipt evid an eil gwech*

## **Kenta diviz**

**Phares**

*(En eur zond war an teatr gand breudeur Jozef war e lerh)*

Anaoud a rit dija ar zal-mañ, e-leh oh bet degemeret, soñj mad am-eus, pa deujeh d'an Ejipt evid ar wech kenta... N'eus netra cheñchet war he zro...

**Ruben**

N'eus netra cheñchet war he zro, posubl eo ; koulskoude n'eo ket hep krena e tostaom diouti en devez hirio.

**Phares**

Hag abalamour da betra ar spont-se a gemerit ?

**Ruben**

Mil aon or-beus na ve tamallet deom eul laeroñsi... Komprenit 'ta : En eur en em gaoud e Kanaan, om bet mantret : e genou or zahajou greun edo an arhant on-devoa roet deoh evid ar gwiniz ! A ! bezit sur, an arhant-se n'eo ket bet laeret gand nikun ahanom hag hen degaset on-deus ganeom evid beza renta deoh.

**Phares**

Seiz korn Beelzebuth !! ne ententan seurt en ho kaoz... Petra ? Daoust ha n'eo ket me an hini 'zo karget da werza ar greun, ha da renta kont euz an arhant a vez bet touchet ?... Hogen, me n'am-eus ket gwelet em-bije eun diner nebeutoh eged ar pezh a dleen da gaoud.

**Ruben**

Penaos neuze e ve c'hoarvezet eun hevelep tra ? Ar pezh 'zo sur, an arhant-se n'eo ket deuet en or seier anezañ e-unan.

**Phares**

Kredi a hellit eo bet fourret eno gand an Doue a zervijt e Kanaan, hag a zo gallouduz, a leverer.... Ne dalv ket eta ar boan tinal eur ger diwar-benn kement-se, na dirag va mestr, na dirag ar re all.

**Ruben**

Pazeogwir e tivennit ouzom, n'her graim ket... ha koulskoude...

**Phares**

Koulskoude petra ? Peoh war an dra-ze, a lavarane-me ; kontit hoh aferiou all, m'ho-peus da ober...

... Justamant : setu arru or ministr, dre m'en-deus klevet moarvad 'oah en em gavet... En em renkit a bep tra.

*(Jozef ha Balthazar a deu er zal : breudeur Jozef, anezo o-unan, a stou d'an douar).*

## **Eil diviz**

**Jozef**

*(en eur bignad war e dron)*

Chomit en ho sav... (*goude m'eo azezet*). Gwelom bremañ ha c'hwi a zo bet tud a her...E peleh ema ar hosa en ho touez ?

**Ruben**

Setu-me amañ, Aotrou.

**Jozef**

Ya ! gwir eo !... hoh anaoud a ran abaoe ho peaj all... Ahanya ! Emichañs ho-peus sevenet ho promesa... E peleh ema ar breur yaouank-se a dlee dond d'hoh heul ?

**Ruben**

N'ema ket pell diouzoh, Aotrou Ministr. (*O poulza Benjamin*). Sellit, setu ar bugel a rankeh gweled dirag ho taoulagad a-raog kredi on lavariou.

**Jozef**

*(D'ar bugel)*

Va bugel, ra viot benniget gand Doue !... Netra hag ho kweled hepken a garg va halon a levenez..... hoh êr a blij din, dreist ar pezh a hellan lavared...Pe oad ho-peus eta, va mignon ?

**Benjamin**

C'hwezeg vloaz am-eus, Aotrou.

**Jozef**

C'hwezeg vloaz ?... Ya ! ho kredi a ran ! Ho ment hag ho tremm hen diskouez sklêr a-awalh... Bremañ, pa ho-peus gwelet dre aze, ar palezou alaouret a zo e kêr, al laouenigez a zo o para war dal va zujidi, daoust ha c'hwi ne asantfeh ket chom atao ganen-me ?

**Benjamin**

O ! nann, Aotrou.... Gwelloh e kavan distrei da di va zad.

**Jozef**

Eur gomz vad eo hounnez, va bugel, eur gomz vad !... Kendalhit da gared evel-se ho tad ; netra kaerroh war an douar, netra talvoudusoh evid tenna warnoh bennoziou an Neñv... (*da Ruben*). A ! edon o vond da ankounac'haad goulenn kelou euz ho tad. Penaoz ema ? Yah eo bepred ?

**Ruben**

Yah eo, Aotrou, a drugarez Doue, evitañ da veza dija krommet gand e oad ha gand an trubuillou en-deus bet. (*Jozef a guz e zaelou*). Or pedet en-deus da ober deoh e wella gourhemennou ha da ginnig deoh ivez euz e berz an nebeud profou on-deus lezet aze e-kichenn dor ho palez, kasedadou rejin ha fiez.

**Jozef**

Kant trugarez dezañ, evid an oll profou-ze. -ha goude,daoust ha n'en-deus on karget da ober eur goulenn bennag ouzin.

**Ruben**

Eo, sur, Aotrou. Euz e berz, ho pedom da werza deom eun nebeud sahajou greun, mar deo ho madelez, ha da rei deom koñje da zsitrei raktal d'or bro : mall a dlee da gaoud da azgweled Simeon ha Benjamin.

### **Jozef**

Ho koulennou a vezo selaouet. Va zervijer Phares a lakaio karga ar seier, e-pad ma tiskennot da gemered eun dra bennag, aze, em zal a enor, e leh e vo rentet deoh ho preur Simeon.

### **An oll**

Mil bennoz deoh, Aotrou madelezuz !

### **Jozef**

Goude beza prejet, e helloh raktal en em lakaad en hent. (*Sevel a ra en e zav*). Ne fell ket din ho tale mui... Kerzit da heul Phares ; -Bremañ ez in da azeza diouz taol, asamblez ganeoh.

### **An oll**

*(en eur zaludi hag en eur vond kuit)*

Mil bennoz deoh, en ano on tad !

# Trede diviz

**Jozef**

*(diskennet diwar e dron)*

Balthazar, pa n'ez eus amañ nemedom on-daou, ez an da zisklêria dirazoh eun dra hag a raio deoh beza mantret... meur a wech, sur on, ho-peus klasket divinoud piou an dud-se a welit hirio em falez evid an eil gwech !

**Balthazar**

N'hen nahin ket, mestr ! Aliez am-eus greet ar goulenn-ze ouzin va-unan, mez hep kaoud respont vad ebed.

**Jozef**

Mond a ran d'ho sklêrijenna... An dud-se, genidig a Ganaan, eo va breudeur.

**Balthazar**

Petra 'livirit aze ? Ho preudeur !... A ! bremañ eh ententan eur seurt bennag... Mez, petra o-deus greet ar re-ze da vihanna, evid beza bet degemeret ganeoh en eun doare ken fall ?

**Jozef**

Ya ! ya ! va breudeur int , e gwirionez ind-i a zo bet pennabeg ma'z on bet degaset evel sklavour beteg ar vro-mañ, en he leh am-eus gellet gounid fiziañs Pharaon... Na gredit ket koulskoude em-befe dalhet kasoni ouz nikun anezo : Nann ! O hared a ran er kontrol a-greiz va halon, ha den n'eo gouest da gompren ar boan am-eus bet o vired d'o briata, en eur lavared dezo er memez amzer piou pn evito.

**Balthazar**

Ho kredi a ran, mestr, abalamour d'ar galon aour a anavezan deoh.

**Jozef**

Mez a-raog ma tizoloin dezo ar wirionez, va houstiañs a hourhemenn din lakaad da boueza war ho tiou skoaz eur groaz all... Hounnez a vezo ar bounnerra, hag amañ, am-eus ezomm euz ho skoazell.

**Balthazar**

Evidon, me, her gouzoud a rit a-bell zo, a raio evidoh n'eus forz petra, gand ma ne vo dreist va nerz.

**Jozef**

Setu amañ ar pezh am-eus c'hoant e rafeh : kemennit d'ho kwardou d'en em zerhel e diabarz ar zal-mañ... Goude-ze en em dennit kuit, ha dre guz fourrit e zahad greun, va breur yaouanka an tas<sup>16</sup> arhant arhant a zervij din diouz taol.

**Balthazar**

En daou hourhemenn-ze n'eus netra re ziêz, netra hag a ve dreist va galloud ; rag-se, sevenet e vint e berr amzer.

**Jozef**

---

<sup>16</sup> tas : galleg, deut da veza gourel.

Gwell a ze ! Bremañ ez an d'en em lakaad e-mesk va breudeur... (*En eur vond kuit*). Na gontit netra euz an traou-mañ, neketa Balthazar ?

**Balthazar**

Entetet eo, mestr !

# Trede diviz

## Balthazar

Mil sarpant ruz ! Setu bremañ eun afer all, ha n' oan ket war hed anezi, tra.. Pebez taol souezuz da ober ! Kemered tas arhant ar Ministr evid hen fourra e-kreiz eur sahad greun !! Ba ! Deom atao gand ol labour. Balthazar n'en-deus nemed e her hag eun dra prometet a dle beza evel eun dra hreet ! (*Gervel a ra ar gwardou*). E ! gwardou ! gwardou !

## Ar gwardou

(*euz a-bell*)

Ha goude ? Ha goude ?

## Balthazar

Deredit amañ, me ho ped, ar henta posubl !

## Misraim

(*o tond gand Eliab*)

Arsa, paour-kêz Balthazar, petra 'zo a-nevez 'ta pa rez deom dereded gand kemend-all a diz ? An tan a zo krog er palez ?

## Eliab

C'hoant az-pefe marteze e rofem dit an dorn evid eur pennad labour bennag ?

## Balthazar

Nag an eil nag egile, mil sarpant ruz !- Setu ar pez a hourhemenn deoh ar ministr dre va genou-me ; e diabarz ar zal-mañ ho-pezo d'en em zerhel hiviziken, evid sikour diluzia kement afer a hellfe c'hoarvezoud abalamour d'an divroidi a zo war-dro ar palez... Amañ eta e rankit chom da ober gward... Amañ, el leh-mañ !

## Misraim

Entetet eo a-bell zo, rag n'eo ket red fourra ennom gand an horz... Emichañs e chomi ivez ganeom ?

## Eliab

Gand da varvaillou, rimadellet ken brao, e kavim on amzer kalz berroh !

## Balthazar

Ar pez a houlennit diganen a zo dreist va galloud, rag din-me ivez ez eus merket labour en eul leh all.

## Misraim

Domaj eo, ventrechien<sup>17</sup> ; n'eo ket gwir, Eliab ?

## Eliab

Eun domaj braz zoken.

## Balthazar

---

<sup>17</sup> ventrechien : galleg.

Ne zervij ket deoh eta konta warnon-me, ha m'ho-peus kement-se a youl da varvaillad, grit ho marvaillou etrezoh ho-taou.

### **Misraim**

Ma ne hellez ket, ne hellez ket, petra 'fell dit ? Kerz da ober da labour, hag her gra a volontez vad : Evidom-ni, Eliab ha me, en em gemer gand on hini evel ma tle pep soudard kaloneg e ober bepred.

### **Eliab**

Kenavo ar henta gwelet, Balthazar, hag heb fachri, te 'oar ?

### **Balthazar**

Ya, kenavo ar henta.

*(Mond a ra kuit)*



# Pemped diviz

**Eliab**

Misraim, ma 'peus entetet eur seurt bennag, ar pezh en-deus klasket Balthazar rimadella deom, aze, eo poent da renka e-mesk ar baotred fin... Evidon-me, sell, hag e rankfen beza kondaonet da gaoud va fenn faoutet dre an hanter, ne ven ket gouest da lavared peseurt afer a ve da ziluzia abalamour d'an divroidi-ze.

**Misraim**

Na me kennebeud, ha koulskoude e tle beza da ziwall, her hredi a hellez, pa 'z om pedet da ober gward en eul leh evel hemañ.

**Eliab**

Da ziwall, a lavaran, me ivez ! M'o-deus da zisfizioud kement-se euz tud Kanaan, perag ez eont-i d'o degemeret evel priñsed, ha d'o lezel da furikad e kement korn euz ar palez ?

**Misraim**

Re a gabestr a vez lezet ganto, evid gwir.

**Eliab**

Ma vijen e plas or Ministr, n'ouzout ket petra em-bije greet ?

**Misraim**

Peseurt 'ta ?

**Eliab**

Diskouez d'an dud-se an toull n'eo ket bet stanket gand ar vañsonerien, hag o lakaad buan war hent o bro... Pep hini e-touez e genvroiz, me ne anavezan nemed al lezenn-ze, ha ma vez heuliet mad, e ve nebeutoh a vizied stoket, mintoue<sup>18</sup> !... A ! ne lavaran ket e ve red chom heb rei greun d'ar re ezommeg, pazeogwir on-deus peadra, mez ober moumounerez da dud ha n'o anavezer ket !... Kement-se avad a zisplj din.

**Misraim**

Lez anezo 'ta : goude toud, petra 'ra ze deom-ni ? Ma c'hoarvez eun taol filouterez bennag, or ministr ne hello tamall nemetañ e-unan.

**Eliab**

*(o sevel e fri)*

O la la ! Misraim, ne zantez netra gand da fri ?

**Misraim**

Nann, zur, Eliab !

**Eliab**

O ! pebez c'hwez vad a deu beteg va fronellou !! Eur bariadenn a rafen ouzit ez eus pourchaset da dud Kanaan eun tamm lib-e-bao a-zoare. Alo, dond a rez-te enni ?

**Misraim**

---

<sup>18</sup> mintoue : m'hen toue ! ( ?)

O ! ne dan ket. Koll a rafen ouzit, rag an oll a oar az-peus eur fri tano, Eliab. (*Phares a weler o treuzi gand eur plajad kig*).

**Eliab**

Hein<sup>19</sup> ! n'am-boa ket skoet just ? Setu Phares o tremen e-biou deom gand eur restad euz ar banked.

**Misraim**

(*o tostaad euz Phares*)

Kig rost, Phares, kig rost ! N'o ket fall beza diouz taol ! Mez, petra 'zo nevez da vihanna, pa 'z eo falvezet d'or ministr kemered eur seurt mizou, hag abalamour da biou ?

**Phares**

Petra 'zo nevez ? It d'her goulenn digand eun all desketoh egedon-me... Ne ententan eur grotenn<sup>20</sup> er pez a dremen hirio. Or mestr a zo evel pa ve e wad o vervi en e oll wazied.... Ne hell ket chom a-blas... Pa azez diouz taol eh en em laka e-kichenn an divroad yaouanka evid servija dezañ ar gwella lodennou.... Bremaig eo bet oh ober eur bale er-mêz, ha pa 'z eo distroet 'oa trez an daelou war e zaoulagad...Komprenit, mar gellit.

**Eliab**

Ha Balthazar, petra 'zoñj euz an traou-ze ?

**Phares**

N'on ket eet d'her huriuzennad, rag gand e labour ema ive a-zevri.

**Misraim**

An divroidi-ze a zo e risk da jom dre aze e-pad pell amzer da stroba kement hini a zo en ti-mañ.

**Phares**

Nan , Misraim ; ne zaleint ket da vond kuit : Edont dija o pourchas loh, war digarez , emezo, ema o zad ouz o gortoz e Kanaan... Mond a ran buan, gand aon ve ezomm ahanon.  
(*Mond a ra kuit*).

**Eliab**

Koulz oa dit dioustu, mintoue, beza lezet ganeom on-daou ar restad kig-se... Ni a vije deuet a-benn anezañ e berr amzer...Kenavo atao, hag heb fachiri.

---

<sup>19</sup> Hein : galleg.

<sup>20</sup> grotenn : ?

# C'hwehved diviz

**Misraim**

*(o chom da vantri)*

Biskoaz n'am-bije soñjet en eun hevelrp tra ! Or ministr gallouduz o tiskenn keen izel-ze ; oh azeza diouz ar memez taol gand divroidi... o servija dezo ar pezh a zo a wella en e di !

**Eliab**

*(dre hoaperez)*

Tu n'az-peus ket c'hoaz an enor-ze, neketa ? da breja er palez ? O ! bez dizoursi, na me kennebeud ; mez on tro en em gavo marteze hebdale.

**Misraim**

*(atao mantret)*

Evel ma n'eus ket a voged heb tan, evel-se ivez an oll draou-mañ n'int ket greet heb abeg... ha koulskoude, kaer am-eus, ne gavan rezon vad ebed da lakaad war a-raog, en despet va spered lemm, anavezet gand an oll.

**Eliab**

Mintoue, te 'zo diskiant a-walh o terri da benn evel-se... Soñj 'ta er blijadur on-defe, ma vem pedet bremaig da vond diouz taol !

**Misraim**

Da zebri restachou tud Kanaan ! Eliba, ne garfes ket evelato.

**Eliab**

Hag abalamour da betra ne garfen ket ? Restachou mad a zo mad da gaoud, hervez m'am-eus klevet a-berz tud hag her gouie.

**Misraim**

Aviz an eil n'eo ket aviz egile. *(Kleved a reer Balthazar o tereded)*. Unan bennag a glevan o tereded war-zu ennom. Chomom sioul.

# Seizved diviz

**Balthazar**

*(a-raog en em ziskouez)*

Gwardou ! gwardou !

**Misraim**

Petra 'zo 'ta, adarre ?

**Balthazar**

Buan en hent ! buan en hent ! Tas arhant or mestr n'ema ket mui er zal da breja.... Laeret eo, ha leh zo da gredi eo bet dibradet gand unan euz tud Kanaan.

**Eliab**

N'am-boa ket lavaret, Misraim ? Setu petra eo ober re a vouvounerez d'an divroidi !

**Balthazar**

It gand tiz war-lerh an dud-se, a-raog ma vezint er-mêz a gêr. Furchit o zeier ha mar kavit an tas arhant gand unan pe unan anezo, grit dezo distrei amañ, ma vezint barnet.

**Misraim**

Mez lavar deom da genta peseurt hent o-deus kemeret.

**Balthazar**

An hent a welit aze, dirag dor-dal ar palez, war-zu ar zav-heol ; sur on, n'int ket c'hoaz arruet gand mogeriou kêr, rag se, ma valeit founnuz, e pakoh anezo hebdale.

**Misraim**

Ventrechien, ne vezer tromplet nemed gand ar re a vez greet vad evito, Eliab. kerzom war-lerh ar friponed-se.

**Eliab**

Me asant koll va ano da virviken ma ne gouez ket al laer etre or meudou... Alo, an troad kleiz da genta... *(Mond a reont d'ar paz en eur gonta assemblez)* : unan,daou, unan daou...

## Eizved diviz

### Balthazar

O ! paour-kêz tud ! paour-kêz tud ! dre begement a drubuillou, siwaz ! eo red dezo tremen ! Pebez spontadenn evito bremaig pa vo greet dezo chom a-zav !... Pebez enkreiz en o spered pa vo kavet tas arhant va mestr, evel eun dra perhennet gand ar yaouanka anezo, hag eñ divlamm kaer... Nann, pa zoñjan en traou-ze oll, n'on ket evid mired da druezi outo ha petra bennag ma ne dint evidon nemed divroidi, em-eus mall braz e vent dizammet, an dud keiz !... (*Gweled a ra Jozef o tostaad*).. – Mestr., kement tra ho-poa gourhemennet a zo greet... E-pad m'edo Phares o servija da zebri d'ho preudeur, me am-eus gellet kaoud an tu da fourra ho tas arhant e sahad gwiniz Benjamin, heb beza gwelet gand den ebed, ha bremañ, p'emaint dija en hent evid distrei d'o bro, am-eus kaset ar gwardou d'o diarbenn, evel m'ho-poa hen gourhemennet.

### Jozef

Pegeid a zo abaoe ma'z eo eet Eliab ha Misraim d'o diarbenn ?

### Balthazar

N'ema ket c'hoaz gwall-bell, evid gwir, mez n'eus forz, ne zaleint ket da zistrei war o hiz, rag ho preudeur n'o-devezo ket bet a amzer da vond beteg mogeriou kêr, a-raog beza tizet.

### Jozef

O ! breudeur baour ! Nag a boan a lakaan-me ober dezo d'ar mare-mañ marteze ! Edont o kerzed war-zu Kanaan, gand an esperañs da weled o zad a zo war-hed anezo, al laouenedigez o para war o zal, o halon karget a anaoudegez vad en or heñver evid ar vad on-deus greet evito, ha bremañ, setu-i evel flastret dindan eur beh spontuz a enkreiz, abalamour din-me.

### Balthazar

N'ho tislavarin ket, ar beh a vo pounner da zougen, mez hen disklêria a hellan, n'eo ket an nerz a vanko d'ho preudeur evid souten ar groaz-mañ a vezo an diweza.

### Jozef

A ya : lavaret mad a rit, Balthazar : o hroaz diweza eo. Dija zoken me am-eus keuz d'ar pezh am-eus gourhemennet en o eneb, ha m'am-bije gellet dond war va hiz, me am-bije espernet dezo ar boan-mañ.

### Balthazar

Mestr, lezit an afer da vond bremañ da benn : goude ar hlahar e teuio al levenez, ha seul vui ma vo bet moustret ar halonou, seul vrasoh e vo al laouenedigez pa vo displeget ar wirionez e fas an oll... (*Klevet e vez greet trouz*). Petra 'glevan-me ?... Daoust hag ar re-hont a ve dija arru en-dro ? (*o selled*). Ya, ind-i eo, mestr ! E penn ar vandenn e welan Benjamin etre daouarn or gwardou.

### Jozef

O ! nag am-eus mall e ve achu !... Va Doue ! va hennerzit, me ho ped, e-kreiz ar stourm-mañ !...

### Balthazar

Pignit atao war ho skabell... Goude-ze, gand ho furnez c'hwi a ouezo penaoz ober evid ar gwella...(*E-pad ma pign Jozef war an tron e klevet ar gwardou er-mêz*).

**Misraim**

Tud digoustiañs ma'z oh !

**Eliab**

Laeron divez !... laeron vil...

**Misraim**

Mond da ober eun hevelep torfet, goude an degemer a zo bet greet deoh ?  
(*O gweled a reer oh antreal*).

# Naved diviz

## Balthazar

Ahanta ! Kavet e o evid doare an tas a oa diank ?

## Misraim

Ya, kavet eo : kerkent ha ma on-deus digoret sah hemañ, on-deus gwelet an tas o lugerni...  
(*da vreudeur Jozef*). Alo ! buan d'an douar evid kleved ar setañs ho kondaono d'ar prizon.

(*An oll a ya d'an douar, nemed Benjamin a zo en e zav, etre ar gwardou, pleget e benn*).

## Jozef

(*goude ober eur zell war e vreudeur*).

Petra 'glevan-me diwar ho penn ?... Goude an degemer a zo bet greet deoh ?... goude beza resevet greun leun ho seier... ho-pefe bet ar fallagriez da ober eun taol evel hennez... da laerez eun tas arhant ! ! Respontit !

## Juda

(*o sevel en e zav*)

Aotrou ministr, mantret, stravuillet om lakaet e gwirionez, gand ar pez a hoarvez ganeom abaoe ma talempredom an Ejipt, heb na vem gouest da lavared netra evid en em zivenn. Red eo deom hen anzañ, gwalenn Doue eo or sko hag en eun doare ken didruez, abalamour d'or pehejou... Pazeogwir eta e fell da Zoue, ni oll a vezo ho sklavourien keit ha ma plijo ganeoh.

## Jozef

Nann !... Nann : ne fell ket din kleved a draou evel-se ; petra 'rafen-me gand unneg sklavour evel-doh ? Ne zalhin ganen nemed an hini a zo bet kavet gantañ va zas arhant : ar re all a zistroio d'o bro.

## Juda

(*o kroazia e zaouarn*)

Aotrou madelezuz, va lezit da ober eur bedenn ziweza, en ano va oll vreudeur, a welit amañ daoulinet e-harz ho treid ha beuzet oll en eur mor a hlahar.

## Jozef

Gedit eur pennad : (*da dud e balez*) Balthazar, Phares, ha c'hwi, gwardou, en em dennit, mar plij, en eul leh all, evid va lezel va-unan gand an dud-mañ.

(*En em denna a reont ha Jozef a jom e-unan gand e vreudeur*).

# Degved diviz

## Jozef

*(da Juda)*

Komzit bremañ ; c'hwi, ha grit e berr gomzou ar bedenn ho-peus goulennet ober.

*(Plega a ra e benn)*

## Juda

Ar patriaj, Jacob, glaharet atao abaoe maro e vab Jozef, ha krommet gand an oad, n'en-deus asantet lezel Benjamin da zond amañ ganeom, nemed en despet dezañ... Ranket en-deus toui dirazañ e respontem euz buhez or bugel. Me va-unan am-eus roet dezañ va ger e tistrofe da Ganaan asamblez ganeom... Gwelit neuze, Aotrou paour, ranngalon an tad-ze, ma c'hoarvez deom distrei heb or breur Benjamin !... Ne hellfe ket herzel gand e hlahar !... Mervel a rafe war an taol...

*(Mond a ra d'an daoulin).*

En an' Doue eta, lezit Benjamin da vond d'ar gêr, ha dalhit ahanon-me en e leh.

## Ruben

Ho-pezet truez, Aotrou, euz daelou on tad muia-karet.

## An oll

Truez ! Truez, abalamour d'on tad !

## Simeon

Kemerit daou ahanom en ho servij, kentoh eged noazoud d'on tad ha d'or breur yaouank !...

## Jozef

*(o sevel pront)*

A-walh !... me ho ped !... a-walh ! Ne hellan ket kuzad pelloh ar wirionez. Savit en ho sav, breudeur vuia-karet... Ruben, Simeon, Juda... Petra ? va dianaoud a rit c'hoaz ? Me eo Jozef, ho preur,, ho-peus gwelet evid ar wech diweza e mêziou Dothain... Benjamin, te da vihanna, tosta diouzin heb aon ebed.

## Benjamin

*(o reded war-zu Jozef a lavar)*

O ! Jozef !

*(E-pad ma pokont an eil d'egile, ar re all a gred a-veh sevel).*

## Ar re all

*(savet war eur hlin)*

Jozef ?... Jozef ?...

## Jozef

Ya, Jozef e-unan : savit eta buan en ho sav, ha na gemerit aon rag netra ebed. *(Senti a reont)* An Aotrou Doue eo en-deus va degaset d'an Ejipt, ha va galvet da veza kenta ministr Pharaon, evid brasa mad va henvroiz, e leh c'hwi, breudeur vuia-karet, n'oh bet nemed oberourien bolontez Doue heb her gouzoud... Alo, ankounac'hait ar pez am-eus greet evid hoh prouhi ha bevom e-giz breudeur.



**Ruben**

O ! Jozef, na me a zo eüruz hirio, o kleved eur seurt kelou !... Mil bennoz da Zoue a reiz pep tra evid ar gwella !

**An oll**

O ya ! mil bennoz da Zoue !

**Simeon**

Me ivez a ve eüruz, Jozef, ma ouezfen e ven pardonet ganez, ervad, evel ma soñj din on bet pardonet dija gand Doue. !

**Jozef**

O ! Simeon ! Simeon !... Perag eun hevelep douetañs ?

**Simeon**

Siwaz ! ... breur paour !... Ar pez am-eus greet en da eneb...

**Jozef**

a zo ankounac'haet... (*en eur ziskenn d'e vriata*). Va lez da rei dit ar pok a lakaio ar siell war ar garantez on unano da viken... (*Her briata a ra*). Distroit bremañ war-zu on tad, da zisklêria dezañ ar pez ho-peus gwelet. Lavarit d'an tad-se euz va ferz dond amañ assemblez ganeoh oll... Evid ho leve e roin deoh douarou Jesen, an draoñienn zrusa 'zo er vro, el leh m'ho-pezo pep tra hervez ho c'hoant. It buan ha na zaleit ket da zistrei... E-pad an amzer-ze, me en em glevo gand Pharaon ha va zujidi, evid pourchas d'on tad an degemer a verit kaoud abalamour d'e oad ha d'e vertuziou...

(*Ar ridoch a gouez*)

## Taolenn a hloar evid achui

E-kreiz an teatr, war eun tron, e weler Jacob,  
gand eur vreh war skoaz Jozef hag ar vreh all war skoaz Benjamin.

A-dreñv an tri-mañ, savet eun tammig uhelloh, e weler Phaniel o terhel eur gurunenn a-  
ziah penn Jacob, e vestr.

A-gleiz e weler en o zav, gand bodou palmez en o dorn, Phares, Balthazar, ar gwardou, tud  
an Ejipt.

A-zehou ema breudeur Jozef, daoulinet ha kroaziet ganto o daouara... E-pad ma vez  
sklêrijennet an daolenn e kanont :

Doue madelezuz  
Selaouit or pedenn.  
Grit ma vim evuruz  
War douarou Jesen.

Pebez dudi gweled  
Eur famill reizet mad !  
Ar vreudeur unanet  
Dindan galloud eun Tad !